



STAD AR C'HELENN DIVYEZH EK E BREIZH E 2009

- **ROADENNOÙ DISTRO-SKOL 2009**
- **STADEGOÙ AR BLOAVEZH-SKOL
2008/2009**

**POL STUDI HA DIORREN
ARSELLVA AR BREZHONEG
HERE 2009**

Taolenn

Bilañs distro-skol 2008	3
Sifroù pennañ	3
Ar c'hinnig kelenn divyezhek e 2009/2010	5
Er c'hentañ derez	7
En eil derez	10
An niver a skolidi divyezhek	11
Emdroadur an niver a skolidi	11
Sifroù distro-skol 2009	18
Klozadur	24
Stagadennoù gant sifroù - Distro-skol 2009	26
Stadegoù ar c'helenn divyezhek evit ar bloavezh-skol 2007/2008	32
Gwirvoud ar c'hinnig war an dachenn	33
Poblañs skol a denn gounid eus ar c'hinnig kelenn divyezhek	34
An departamantoù	36
Ar broioù	39
An DFKE	41
Ar c'humunioù	44
Feur an deskadurezh divyezhek dre garter e kêrioù pennañ Breizh	50

Bilañs distro-skol 2009

E 2009, evit an 32vet distro-skol da-heul, e talc'h ar rouedad skolioù d'en em zispakañ ha **kresk zo gant sifroù ar c'heleñn divyezhek atav**. Goude bloavezhioù ma oa disteroc'h ar c'hresk eo kreñvoc'h lusk an diorren er bloaz-mañ. Un tres bravoc'h zo da zistro-skol 2009 eget d'ar re a-raok neuze : digoradurioù e pep departamant, kresk kreñv er skolioù-mamm da gentañ-penn, muioc'h a skolidi o kenderc'hel gant an hentad divyezhek er skolaj, h.a.

N'emañ ket c'hoazh ar c'hresk-se diouzh an hini a vefe dleet evit mont diouzh ar pal lakaet gant ar Rannvro e 2004. Ha dre ma n'eo ket liammet ar wellaenn stadet ouzh ur c'hemm en doare da frammañ an digeriñ lec'hioù nevez n'haller ket bezañ sur ne c'horrekao ket endro ar c'hresk a-benn bloaz.

Sifroù pennañ

Digoradurioù

- **6 lec'h divyezhek ouzhpenn er skolioù-mamm** (3 e 2008, 8 e 2007) :
 - 2 gant Diwan (hentad dre soubidigezh) : Rianteg (56) ha Saveneg (44),
 - 4 gant an hentadoù par-ouzh-par :
 - 2 gant an deskadurezh publik : Pleuzal (22) ha Banaleg (29),
 - 2 gant an deskadurezh katolik : digoret ez eus bet lec'hioù e Lokmaria-Redon (35), Ploneour-Lanwern (29) ha Noal-Pondi (56) met serret ez eus bet unan e Plouvien (29).
- **Evit ar wech kentañ ez eus bet digoret d'an nebeutañ ul lec'h nevez e pep departamant.**
- **Ur lec'h ouzhpenn a ginnig ur c'hendalc'h en eil derez**, un hentenn brevez zo bet digoret e skolaj Langedig (56).

Sifroù

- **Pazenn an 13 000 skoliad divyezhek zo bet tremenet en distro-skol-mañ : 13 035 skoliad divyezhek** a zo e Breizh ha 42 e Pariz :
 - 3 167 skoliad e Diwan,
 - 9 868 skoliad en deskadurezh par-ouzh-par : 5 424 er c'hlasoù divyezhek publik ha 4 444 skoliad er c'hlasoù divyezhek katolik.
- **748 skoliad divyezhek ouzhpenn** zo e Breizh e-keñver 2008 (547 a oa e 2007 e-keñver 2006) : distreiñ a reer da sifr distro-skol 2005.
- **Er skol-vamm** emañ ar c'hresk en e uhelañ : +335 (+234 er skol-gentañ).

- **En Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel** emañ ar feur kreskiñ en e uhelañ : +11,5% ha +8%.
- **E bro Brest** emañ o chom tost ur c'hard eus ar skolidi divyezhek atav. Derc'hel a ra he fouez dreist. War-nes tremen bevenn an 3 000 skoliad emañ ar vro-se.
- Bevenn ar miliad skoliad divyezhek zo bet tremenet gant bro Treger ha Goueloù (1018 skoliad).
- **Roazhon** eo ar gumun a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek hiviziken (574). O paouez tremen dirak Gwened emañ (559).

Emdroadurioù


- **Kenderc'hel a ra** an niver a skolidi divyezhek **da greskiñ** : +6,1%. Brasoc'h eo ar c'hresk-se eget hini 2008.
- Gant **Diwan** emañ ar c'hresk brasañ er skolioù-mamm : +8,2%.
- En **hentad divyezhek publik** emañ ar c'hresk hollek brasañ evel m'emañ abaoe ar pevar distro-skol diwezhañ : +8,13%.
- Daoust da bep tra, stabil eo kresk an hentad publik (8,13% e-skoaz 8,17% e 2007) tra ma vrasa re an hentadoù all.

Ar c'hinnig kelenn divyezhek e 2009/2010

E 2009 e kinniger an deskadurezh divyezhek e **389 skol** (377 skol e 2008). Dasparzhet int **war 131 kumun** (126 e 2008), da lavaret eo 8,8% eus kumunioù Breizh. Ul lec'hiad zo e Pariz ouzhpenn.


Dleout a ra ar gerent kaout ur c'hinnig deskadurezh divyezhek tost d'o lec'h annez. **Ur c'heloù mat-tre eo neuze e vefe d'an nebeutañ ul lec'h nevez e pep departamant en distro-skol-mañ.** Ar wech kentañ eo e c'hoarvez an dra-se abaoe deroù an deskadurezh divyezhek (1977).

Ar c'hinnig kelenn divyezhek dre vro - Distro-skol 2009



Ur c'hinnig divyezhek a gaver en **ur vro ouzhpenn** en distro-skol-mañ : **bro Kreiz Liger-Atlantel** gant skol Diwan Savenneg. Ur c'hinnig divyezhek a gaver e 20 bro diwar an 29 zo.

Ar c'hinnig kelenn divyezhek dre DFKE - Distro-skol 2009




Daou DFKE ouzhpenn a ginnig un hentad divyezhek abaoe an distro-skol : Kumuniezh Kumunioù (KK) an Trev (22) ha KK al Liger hag an Erv (44). **62 DFKE** zo gant ul lec'h divyezhek d'an nebeutañ diwar ar 140 framm etrekumunel zo e Breizh, da lavaret eo 44% eus frammoù etrekumunel Breizh.

Lakaat a ra ar gartenn-mañ war wel pegen stank eo ar c'hinnig deskadurezh divyezhek e kornôg ar vro e-keñver ar reter. Er c'hornôg ne chom mui nemet un dornad kumuniezhioù kumunioù diskol a zeu war-c'horre evel enezennoù enklozet tonket da vont da get. Er reter ez a war stankaat ar rouedad skolioù tamm-ha-tamm da-heul an hentoù bras hag en-dro d'ar c'hêrioù pobletañ.

Er c'hentañ derez

Stad ar c'hinnig kelenn divyezhek er c'hentañ derez (skolioù-mamm ha skolioù-kentañ) - Distro-skol 2009



Bloavezh su Breizh eo 2009 kentoc'h. Evit ar wech kentañ abaoe deroù an hentad divyezhek ez eus bet digoret skolioù nevez en holl zepartamantoù. Ur c'hinnig zo bremañ e kornioù a oa chomet dibourvez betek-henn : Savenneg etre Naoned ha Sant-Nazer, koulz ha Pleuzal e reter Treger pe Rianteg (ribl kleiz aber ar Blavezh).

6 lec'h divyezhek ouzhpenn zo er c'hentañ derez da zistro-skol 2009 :

- 2 skol gant Diwan (2 e 2008, 1 e 2007) : ur skol nevez e Rianteg (56) hag ur skol e Savenneg, anezhi ar skol divyezhek kentañ digoret el Liger-Atlantel abaoe 1999.
- 2 lec'h gant an hentad publik (2 e 2008, 4 e 2007) : Pleuzal (22) ha Banaleg (29).
- 3 lec'h gant an hentad prevez katolik (hini ebet e 2008, 3 e 2007) : Lokmaria-Redon (35), Ploneour-Lanwern (29) ha Noal-Pondi (56). Evit an eil bloavezh diouzh renk ez eus bet serret ul lec'h divyezhek kentañ derez avat : hini Plouvien (29) ma oa 37 skoliad e 2008/2009 koulskoude.

Gant se, ha pa vefe 7 lec'h divyezhek nevez d'an distro-skol-mañ, ne gontar nemet 6 lec'h ouzhpenn war an hollad.

175 skol-vamm ha 166 skol-gentañ zo. An hentad divyezhek publik eo a ginnig ar muiañ a lec'hioù : 74 lec'h divyezhek er skol-vamm.

Muioc'h a lec'hioù nevez zo er skol-vamm eget er skol-gentañ : 6 lec'h ouzhpenn zo er skol-vamm ha kenderc'hel a ra an hentad divyezhek e 4 skol-gentañ ouzhpenn. Un tuadur mat eo pa oa c'hoarvezet ar c'hontrol warlene : **talvezout a ra ez eus muioc'h a lusk gant an diorren eget warlene.**

Arabat disoñjal emeur er bloaz-mañ dindan an niver keitat a zigoradurioù a veze etre 2000 ha 2007 avat. Arvarus eo evit an dazont : seul nebeutoc'h a skolioù-mamm a vez digoret, seul vui e vo diazezet ar c'hresk bloaziek war ar skolioù kozh.


Kinnig kelenn divyezhek e pep hentad (skolioù-mamm ha skolioù kentañ) - Distro-skol 2009



Diskouez a ra ar c'hartennoù-se eo gant ar prevez emañ ar rouedad en he digempouesañ : staliet eo an hentad e Bro-Leon hag e bro Kêr-Wened dreist-holl. Lec'hioù prevez nevez an distro-skol-mañ n'emaint ket war an tachennoù-se koulskoude ; arouez poloù nevez en deskadurezh katolik int (Pondi, Redon hag ar Vro Vigoudenn). Gant Diwan e vez tizhet ar c'hornioù pobleañ (an aodoù hag ar c'hêrioù bras pe etre). Gant ar publik emañ ar rouedad stankañ hag a denn kalzik da gartenn hollek ar c'hinnig neuze.

War dachenn an digeriñ eo bet un tamm gwelloc'h an distro-skol-mañ eget hini 2008. Ret eo notenniñ memes tra e oa prest raktres Banaleg da zigeriñ e 2008 gant 22 skoliad. Un hentad publik a oa da zigeriñ e skol Les Batignolles e Naoned e 2009 met ampellet eo bet d'ar mare diwezhañ. Digoret eo bet lec'h Pleuzal pemzektez goude an distro-skol a-drugarez da labour youlek ar gerent. Raktresoù all n'int ket bet digoret en deskadurezh publik e Pleiben, Gwerliskin pe Hañveg. En hentad prevez ez eus bet serret ur skol e Plouvien ma oa 37 bugel warlene. Heñveldra a oa c'hoarvezet en Oriant e 2008.

Keñveriadenn an niver a lec'hioù publik nevez digoret e Breizh hag e Penn-ar-Bed gant Elzas ha Norzheuskadi - Distro-skol 2009



Pa geñverier gant Elzas ha Norzheuskadi, daou diriad ma ya war-raok an hentadoù divyezhek ha m'eo kreñv pouez ar c'helenn divyezhek er boblañs skol (s.o. al lodenn *Stadegoù ar c'helenn divyezhek evit ar bloavezh-skol 2008/2009*, p. 32), e verzer he deus Breizh dilañs-bras e-keñver an digeriñ lec'hioù nevez :


- Ma vije lusk Breizh diouzh hini Elzas e vije bet digoret **49 lec'h publik nevez** en distro-skol-mañ da lavaret eo tost da 25 gwezh muioc'h eget ar pezh zo bet digoret e gwirionez. Ma keñverier gant Penn-ar-Bed (an departamant a zigor ar muiañ a lec'hioù publik) e vije bet digoret 10 lec'h en distro-skol.
- Ma vije lusk Breizh diouzh hini Norzheuskadi e vije bet digoret **104 lec'h publik nevez** en distro-skol-mañ da lavaret eo tremen 50 gwezh muioc'h eget ar pezh zo bet digoret e gwirionez. Ma keñverier gant Penn-ar-Bed e vije bet digoret 21 lec'h en distro-skol.

N'eo ket heñvel tre-ha-tre pep hini eus an tri ziriad keñveriet aze met **diskouez a ra ar fed-mañ ez eo posupl-tre diorren an niver a vugale divyezhek e Frañs**. E Strasbourg, da skouer, e konter bremañ 13 skol-vamm divyezhek er publik tra ma ne gaver nemet div anezho, d'ar gwellañ, e kêrioù pennañ Breizh. Bras eo an diforc'h etre an Akademiezhoù en doare da verañ kinnig ar c'helenn divyezhek enta.

En eil derez

Da zistro-skol 2009, ez eus **ur skol ouzhpenn** o kinnig ur c'hendalc'h en eil derez : ur skolaj prevez katolik e Langedig. **N'eus bet digoret lec'hiad ebet el lise e hentad ebet.**

Kinnig kelenn divyezhek kinniget en eil derez (skolajoù ha liseoù) - Distro-skol 2009



Daoust d'an ezhommoù, n'eo ket gwellaet kalz ar c'hinnig en eil derez en distro-skol-mañ gant ul lec'h nevez hepken e skolaj prevez Langedig¹. E 1988 e oa bet digoret skol eil derez kentañ an deskadurezh divyezhek e Breizh (ur skolaj Diwan). Abaoe, ne oa c'hoarvezet nemet ur wech, e 1992, ne vefe digoret nemet un hentenn eil derez.

N'eus bet digoret lec'h ebet en eil derez gant an hentad publik. Ouzhpenn 20 hentenn divyezhek publik a chom a-sav e CM2.

En deskadurezh prevez katolik eo fonnusoc'h ar c'hinnig er skolajoù eget en deskadurezh publik (nebeutoc'h a skolajoù prevez zo dre-vras). Gallout a rafed kontañ un 10 hentenn divyezhek prevez bennak a chom a sav e CM2 memes tra. Dister eo ar c'hinnig el liseoù prevez : n'eus nemet e Lesneven ma c'heller kenderc'hel betek al lise (e lise Sant-Paol Gwened ne vez kinniget danvez nann-yezhel ebet d'ar skolidi divyezhek).


Chom a ra treut ar c'hinnig en eil derez e-keñver hini ar c'hentañ derez.

¹ An digoradur er skolaj-se a gempouez ar fed n'eus skolajiad ebet ken degemeret e 6^{vet} ha 5^{vet} skolaj divyezhek prevez an Oriant .

An niver a skolidi divyezhek


Emdroadur an niver a skolidi

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek dre hentad - Distro-skol 2009



Kenderc'hel a ra poblañs ar c'heleñn divyezhek da greskiñ a vloaz da vloaz abaoe an deroù. Gorrekaat a rae ar c'hresk da bep distro-skol abaoe 2004 met kemer a ra un tamm lusk en-dro en distro-skol-mañ.

An niver a vugale ouzhpenn en hentad divyezhek da bep distro-skol abaoe 1998




Brasoc’h eo an niver a skolidi divyezhek ouzhpenn en distro-skol-mañ eget na oa bet e-kerzh an tri bloaz diwezhañ. Ur wellaenn eo ha pa ne rafe sifr 2009 nemet klotañ gant keidenn an dek vloaz a-raok (754 skoliad ouzhpenn da bep distro-skol well-wazh).

Div elfenn a c’hoari war an niver a vugale ouzhpenn da bep distro-skol : sifroù ar skolioù ouzhpenn ha kresk diabarzh ar skolioù a oa anezho bloaz a-raok dija. Ar c’hresk liammet ouzh ar skolioù nevez a zo diouzh an niver anezho : well-wazh, kement skol nevez a zegas etre 20 ha 25 bugel ouzhpenn. Peurrest ar c’hresk kriz a dalvez evit kresk diabarzh an hentennoù “kozh”.

Dizehan e vichanae ar c’hresk diabarzh abaoe bloavezhioù. Kreñvoc’h eo ar bloaz-mañ avat met n’eo ket sklaer an abegoù zo d’an dra-se : brasaet mat eo an niver a skolajidi da skouer daoust ma n’eus nemet ur skolaj divyezhek ouzhpenn en distro-skol-mañ (ha c’hoazh). Setu dibosupl eo lavaret ma vo kreñvoc’h adarre ar c’hresk diabarzh a-benn bloaz pe get.


Ma vefe kadarnaet e 2010 gwellaenn an distro-skol-mañ e c’hallfe bezañ etre 850 ha 1000 skoliad divyezhek ouzhpenn, da lavaret ur c’hresk kriz kevatal da re deroù ar bloavezhioù 2000. Met ijinañ diwar vartezeoù ez eo rak, dre ma n’eur ket evit displegañ fraezh ar perag hag ar penaoz eus gwellaenn 2009, n’haller ket gouzout ha derc’hel raio en amzer pe get : ken buan all e c’hallfe bezañ 500 bugel ouzhpenn hepken e 2010.

Emroadur kresk bloaziek ar c'helenn divyezhek abaoe 1998



Distreiñ a ra kresk bloaziek ar skolioù divyezhek e 2009 d'ar pezh e oa e 2007. **Un darvoud kalonekaus eo goude 9 bloavezh gorrekadur didroc'h pe dost. En desped da se e chomer gant unan eus kreskoù izelañ an deskadurezh divyezhek biskoazh.**

Emroadur an niver a skolidi divyezhek dre zepartamant abaoe 1999



Feur emdreiñ etre 1999 ha 2009


Aodou-an-Arvor	+97,3%
Penn-ar-Bed	+123,4%
Il-ha-Gwilen	+189,7%
Liger-Atlantel	+120,2%
Mor-Bihan	+151,8%
Breizh	+129,8%

Er munudoù e weler e kresk an niver a skolidi divyezhek en holl zepartamantoù ; kement-se a stader tost bep bloaz.

N'eus nemet er Mor-Bihan hag e Penn-ar-Bed ez eus bet digoret lec'hioù nevez ingal e-kerzh an dek vloaz tremenet. Ha pa greskfent atav, n'eo ket emdroet ken buan ar sifroù en Aodoù-an-Arvor hag e departamantoù all ; an diouer a zigoradurioù abaoe 2000 zo kaoz emañ kont evel-se². N'eo ken gwell a se neuze e vefe digoradurioù e pep departamant er bloaz-mañ : **pa vez digoradurioù ingal e talc'h ar c'hresk bloaziek gant ul lusk kreñvoc'h.**

En Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel ne vez digoret nemet skolioù Diwan pe klasoù divyezhek prevez. El Liger-Atlantel da skouer, e chom enket ar raktresoù skolioù en deskadurezh publik abaoe tremen dek vloaz daoust da c'houlenn ar gerent. Dre chañs e kendalc'h ar skolioù zo anezho c'hoazh da ziorren ha da greskiñ (e-touez re vrasañ Breizh emañ skolioù divyezhek publik Naoned ha Roazhon).


Emdroadur sifroù ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez abaoe 1999 keñveriet gant lusk an digoradurioù



Digeriñ ingal skolioù nevez zo ezhomm ouzhpenn ar c'hresk diabarzh evit ma chomfe ar c'hresk hollek en e sonnañ. Ar gartenn amañ a-us a gadarna an tuadur “seul vui, seul c'hoazh” a c'hoari evit Penn-ar-Bed da gentañ-penn. **Lakaat a ra anat e c'haller kenderc'hel da grouiñ skolioù lec'h ma'z eus anezho dija ha kenderc'hel d'ober berzh muioc'h-mui.** Diskouez a ra ar gartenn-mañ ivez e c'haller lakaat an tuadur-se da dalvezout e pep lec'h : e tost an holl zepartamantoù e weler krommenn an niver a skolidi o sonnaat a-drugarez da zigoradurioù distro-skol 2009.

² 17 digoradur en Aodoù-an-Arvor e-skoaz 32 e Penn-ar-Bed ha 29 er Mor-Bihan.

Feur emdreiñ an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre departamant e 2009 e-keñver 2008



Eus an hentad publik e teu ar pep brasañ eus kresk 2009 c’hoazh met chom a ra stabil kresk sifroù an deskadurezh publik goude daou vloavezh gorrekadur tra ma teu lusk en-dro gant an daou hentad all.

En e uhelañ abaoe 2003 emañ kresk bloaziek Diwan er bloaz-mañ. N’emeur ket pell ken eus al lusk kreskiñ a oa ganti a-raok na vefe nac’het hec’h enframmar en deskadurezh publik (2002). Ar braz eus ar c’hresk a zeu eus ar skolioù-mamm, zo kaeroc’h, tra ma teue dreist-holl eus ar skolidi a gendalc’he gant o hentad en eil derez er bloavezhioù diwezhañ. **Evit ar wech kentañ abaoe tremen dek vloaz emañ ar c’hresk brasañ er skolioù-mamm gant an hentad dre soubidigezh : +8,2%**. Setu aze frouezh kentañ politikerezh digeriñ skolioù nevez Diwan.

Un tamm gwelloc’h eo emdroadur kresk bloaziek an hentad prevez katolik goude distro-skol 2008 (lec’h nevez ebet hag ul lec’h serret). Liammet eo kresk 2009 d’an hentenn bet digoret e Lokmaria-Redon (35) peurgetket. Daoust da se n’eur ket distro d’al lusk diorren a oa gant an hentad katolik betek 2005 (da 20% pe dost e save ar c’hresk bloaziek keitat etre 1996 ha 2005).

Brasoc’h eget warlene eo kresk hollek ar sifroù e pevar departamant diwar bemp. An tamm nerzh adaptet gant Diwan hag an hentad prevez eo abeg pennañ an emdroadur-se.


N’eus nemet el Liger-Atlantel m’eo un tamm bihanoc’h ar c’hresk hollek eget warlene (+8% e-skoaz +9,3%). Ur raktres publik a oa prest e Naoned gant 14 bugel ragenskrivet ; **gant se e vefe bet uheloc’h kresk bloaziek an departamant eget warlene : 11,3%**. Daoust da se ez eo al Liger-Atlantel an eil departamant a gresk ar muiañ war-lerc’h Il-ha-Gwilen.

En Il-ha-Gwilen eo emañ ar feur kreskiñ en e uhelañ en distro-skol-mañ (+11,5%) a drugarez d’al lec’h nevez digoret en deskadurezh prevez e Lokmaria-Redon, pergen, ha da

skolioù publik ha prevez Bruz ha Gwitreg. Pa seller ouzh an niver a vugale ouzhpenn e weler emañ bremañ degouezhet Il-ha-Gwilen da live Aodoù-an-Arvor war-bouez un netraig (99 e-skoaz 106) ha deuet eo Roazhon da vezañ ar gêr bennañ a-fet niver a skolidi divyezhek.

Goude bezañ aet war c'horrekaat e-pad meur a vloaz e teu un tamm lusk en-dro gant kresk ar c'helenn divyezhek er Mor-Bihan : ouzhpenn daougementet eo e-keñver 2008. Daoust da se, ar feur hollek izelañ a ya gant an departamant-se er bloaz-mañ c'hoazh. Dregantadoù kreskiñ Penn-ar-Bed hag Aodoù-an-Arvor n'int ket uhel-uhel kennebeut. Dre m'eo brasoc'h ar c'hinnig e departamantoù ar c'hornôg dija ez eus ezhomm da zigeriñ muioc'h a skolioù enno evit derc'hel d'al lusk diorren. **Ul lec'h nevez pe zaou n'eo ket a-walc'h en departamantoù-se evit kinnig feurioù kreskiñ a vefe tostoc'h da 10%.**

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre zepartamant da zistro-skol 2009 e-keñver 2008



Kreskiñ a ra an niver a skolidi divyezhek dre ar c'hentañ derez dreist-holl. Er skolioù-mamm emañ ar c'hresk uhelañ gant ar sifroù kriz, ar pezh a zo un dra vat evit an diorren er bloavezhioù da zont. **Ne oa ket c'hoarvezet ken abaoe 2001 e vefe muioc'h a skolidi ouzhpenn er skolioù-mamm eget er skolioù-kentañ** (gwir eo gant ar c'henfeurioù ivez). Kement-se a ya war an tu mat, gant ma vo **lec'hioù nevez gant pep hentad hag e pep departamant er bloavezhioù da zont ivez.**

Er skolajoù ivez eo brasoc'h ar c'hresk ha pa ne vefe nemet ul lec'h nevez e 2009 : **ar wech kentañ eo ez eus kement a skolajidi ouzhpenn.** Diouzh ar c'henfeurioù, ne oa ket bet ur feur kreskiñ ken uhel er skolajoù abaoe 2003. N'eo ket kenkoulz emdroadur al liseoù avat. **Pouezus-bras eo e vefe kalz a skolidi o vont betek ar vachelouriezh gant an hentad divyezhek** koulskoude : seul ampartoc'h e vint war o yezh.

Un drederenn eus kresk ar skolioù-mamm a c'hoarvez eus departamant Penn-ar-Bed, ar pezh n'eo ket dister, met tremen 80% eus kresk ar skolioù-kentañ a ya gantañ. Diskouez a

ra e chom bras a-walc'h al lusk diorren en departamant-se met, dre m'eo kreñv er skolioù-kentañ dreist-holl, e tenn al lusk-se d'al lec'hioù digoret er bloavezhioù tremenet muioc'h eget d'al lec'hioù digoret da ziwezhañ-tout.

Ouzh emdroadur ar sifroù er skolajoù eo liammet kresk al Liger-Atlantel dreist-holl. Daou skolaj a ginnig ur c'helell divyezhek eno tra ma ne oa hini ebet e 2006 c'hoazh. Mat eo al lusk anezho.


En deskadurezh dre-vras e konter muioc'h a vugale er skolioù kentañ (pemp bloavezh skoliata) eget er skolioù-mamm (pevar bloavezh skoliata d'ar muiañ). E Breizh, da skouer, e sav an darempred da 0,7 well-wazh, da lavaret eo e konter 7 bugel er skolioù-mamm evit 10 er skolioù-kentañ. Liammet strizh ouzh ar boblañsouriezh eo ar stad-se.

En hentadoù divyezhek n'emañ ket kont evel-se en abeg d'al lusk diorren zo ganto. En ur gumun bennak, pa ziskenn an **darempred skolioù-mamm/skolioù-kentañ** er c'helell divyezhek d'ar sifr keitat (0,7) ez eus tu da lavaret ez eus bet tizhet un doare kempouez ha ne gresko ket kalz ar sifroù ken e-keit ha ne vo ket digoret ur skol nevez en tolead.

Da 1,01 e sav an darempred-se evit an hentadoù divyezhek da zistro-skol 2009. Danvez o deus c'hoazh da vont war-raok neuze. Koulskoude, an danvez-se n'eo ket ken bras ha ma oa gwechall. E 1999 e save an darempred da 1,24 da skouer. Un tamm brasoc'h eget e 2008 (0,97) eo an darempred en distro-skol-mañ avat ; ar pezh zo reizh pa'z eus bet digoret muioc'h a lec'hioù nevez. **Seul vui a skolioù-mamm o tigeriñ seul greñvoc'h an diorren er bloavezhioù da-heul.**

Ar gartenn amañ dindan a ziskouez mat an tuadur-mañ : e 1999 e oa muioc'h a skolidi divyezhek er skolioù-mamm eget er skolioù-kentañ e pep departamant. An dra-se n'eo ket gwir ken e 2009, nemet en Il-ha-Gwilen.



Emdroadur keñveriet an niver a skolidi divyezhek er skolioù-mamm hag er skolioù kentañ e 1999, 2004 ha 2009



Sifroù distro-skol 2009

13 035 skoliad a heuilh un deskadurezh divyezhek brezhoneg-galleg e Breizh da zistro-skol 2008 (ha 42 e Pariz). Kreskiñ a ra an hentadoù divyezhek atav. **748 skoliad ouzhpenn** zo en hentadoù divyezhek e Breizh e-keñver 2008.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek hag ar skolidi nevez skoliataet dre zepartamant - Distro-skol 2009



Dasparzh ar skolidi nevez skoliataet en hentadoù divyezhek

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek




Penn-ar-Bed eo atav an departamant a skoliata **ar muiañ a skolidi divyezhek** (44% eus an hollad) met n'eo ket ken bras e bouez hag er peurrest eus poblañs ar yezherien avat (tremen 50% eus ar vrezhonegerien deuet d'o oad a oa o chom e Penn-ar-Bed hervez enklask 1999 an EBSSA³ ha 57% hervez enklask 2007 TMO Régions⁴). E Penn-ar-Bed emañ skoliataet an hanter eus ar skolidi divyezhek ouzhpenn e 2009 memes tra. Merzout a reer en distro-skol-mañ lodenn vrasoc'h-vras skolidi Il-ha-Gwilen ha Liger-Atlantel ivez ; kement-se diwar-goust Aodoù-an-Arvor ha, dreist-holl, ar Mor-Bihan.

³ EBSSA : Ensavadur Broadel ar Stadegoù hag ar Studioù Armerzhel (INSEE e galleg)


⁴ Broudic F., 2009. Parler breton au XXI^e siècle – Le nouveau sondage de TMO-Régions. Sant-Tonan, 208 pajenn.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre zepartamant - Distro-skol 2009




Er c’hentañ derez emañ tremen 80% eus ar skolidi divyezhek en holl zepartamantoù.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad - Distro-skol 2009



En hentad dre soubidigezh ez eus ur c'hard bihan eus hollad ar skolidi divyezhek. En hentadoù par-ouzh-par emañ an 9 868 skoliad all: 42% eus an hollad er c'hlasoù divyezhek publik ha 34% er c'hlasoù divyezhek katolik. An hentad **publik** eo a skoliata **ar muiañ a skolidi divyezhek** atav. Gantañ emañ ar c'hresk brasañ er bloaz-mañ ouzhpenn-se ken a-fet sifroù kriz (+408 skoliad), ken a-fet feur kreskiñ (+8,13%). En hentad publik emañ tremen an hanter eus ar skolidi skoliataet ouzhpenn er c'heledd divyezhek e distro-skol 2009. Daoust da se ez eo mat gouzout e chom **brasoc'h ar feur kinnig hag ar feur skoliata en div yezh en hentad katolik eget en hentad publik** (gw. lodenn ar *Stadegoù ar c'heledd divyezhek evit ar bloavezh-skol 2008/2009*, p. 32).


Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre zepartamant - Distro-skol 2009



Kreskiñ a ra lodenn an hentad publik en departamantoù alies, nemet en Il-ha-Gwilen m'eo brasaet kalz lodenn an hentad prevez (+5 poent en distro-skol-mañ) : n'eus bet digoret lec'h publik nevez ebet eno abaoe 2003.

Koulskoude e stadomp eo ingaloc'h dasparzh ar c'hresk etre an hentadoù hag etre an departamantoù er bloaz-mañ eget warlene : ur c'hard eus kresk kriz an distro-skol-mañ zo stag ouzh lec'hioù divyezhek publik Penn-ar-Bed. Kalz eo met d'un hanter e save ar rann-se e 2008. Warlene hor boa stadet ur gorrekadur e kresk an departamantoù all estreget Penn-ar-Bed ; harzet eo ar gorrekadur-se e 2009.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre live ha dre vro - Distro-skol 2009



Bro Brest eo ar vro enni ar muiañ a skolidi divyezhek atav : tost ur c'hard eus an hollad. Ganti emañ ar c'hresk kriz brasañ er bloaz-mañ ivez : 152 skoliad ouzhpenn, da lavaret eo 20% eus kresk an niver a skolidi divyezhek en distro-skol-mañ. N'eus bet digoret lec'h nevez ebet e bro Brest koulskoude ; ar c'hresk diabarzh ha lusk an digoradurioù er bloavezhioù tremenet eo a zeu war wel aze.


Daoust da se, n'emañ ket bro Brest e-touez ar broioù a ziskouez ar brasañ lusk diorren er mare-mañ. Div arouez a c'haller kemer e kont evit priziañ al lañs-se : kenfeur emdroadur bloaziek ar sifroù (en 11^{vet} renk ar broioù emañ bro Brest er c'heñver-se) hag ar fed da gaout un niver bras a vugale divyezhek er skolioù-mamm (da skouer, sellet er gartenn a-us ouzh ar broioù m'eo brasoc'h an niver a vugale er skolioù-mamm eget er skolioù-kentañ).

Gant an div arouez-se e verzer e vefe kentoc'h e bro Gerne, bro an Oriant, bro Roazhon, bro Gwengamp ha bro an Alre ez afe an deskadurezh divyezhek war-raok ar muiañ er mare-mañ. E bro Gerne e stader ar c'hresk kriz brasañ er skol-vamm evit an eil bloavezh diouzh renk (ar vro nemeti enni daou zigoradur e 2009 eo). Un dra vat eo evit ar vro-se zo kalz a zale ganti c'hoazh. Un tuadur mat eo evit bro an Oriant ivez ma oa bet fall distro-skol

2008. Digoradurioù zo bet er pemp bro meneget a-us er bloaz-mañ pe warlene, nemet e bro an Alre.

En tu all da se e tigrask an niver a skolidi divyezhek e teir bro (peder bro a “golle” skolidi divyezhek en distro-skol 2008, met unan hepken e 2007). Cheñch-dicheñch eo emdroadur an niver a skolidi e broioù zo abalamour d'an diouer a ginnig skolioù divyezhek enno. Ezhomm zo da greñvaat ar c'hinnig divyezhek er broioù-se o krouiñ lec'hioù nevez.

Dasparzh an niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre vro - Distro-skol 2009



E-touez an 20 bro enno ur c'hinnig divyezhek e kaver an tri hentad divyezhek e 13 anezho, e kaver daou hentad e 2 anezho (bro Ploermael ha bro Redon) hag ar 5 bro a chom ne ginnigont nemet un hentad (bro ar Briver, bro Gwitreg, bro Sant-Maloù, bro Dinan ha bro Kreiz Liger-Atlantel). E Breizh-Uhel emañ an holl vroioù-se m'eo strishoc'h ar c'hinnig.

Diouzh ar c'henfeurioù e kresk mat niver skolidi Diwan e bro an Oriant (a-drugarez da skol nevez Rianteg), bro Gwengamp, bro Pondi ha bro Naoned (kresk e skol Diwan Naoned hag e skolaj Sant-Ervlan).

Kresket eo sifroù kriz an hentad divyezhek publik, dreist-holl e bro Brest (110 skoliad ouzhpenn tra ma oant 127 warlene, brasoc'h e vefe ar sifr ma vije bet kaset raktres Hañveg da benn vat e 2009) hag e bro Gerne (lusk zo en-dro gant an hentad publik e bro Gerne er bloavezhioù diwezhañ a-drugarez d'ar skolioù nevez-digoret eno). Diouzh ar c'henfeurioù avat ez eo kentoc'h e bro Sant-Maloù (m'eo bihan c'hoazh an niver a skolidi), bro an Alre, bro Gwengamp hag bro Naoned ez a ar muiañ war-raok an hentad divyezhek publik. N'eus

digresk nemet e teir bro, anezho broioù m'eo bresk a-walc'h an hentad publik c'hoazh gant skolioù en o-unan kentoc'h.

Evit ar pezh a denn d'an hentad divyezhek katolik eo brazik ar c'hresk e bro Montroulez. Diouzh ar c'henfeurioù ez a an hentad war-raok e bro Redon (digoradur Lokmaria), bro Gerne (digoradur Ploneour-Lanwern), bro Roazhon ha bro Gwitreg. War zigreskiñ ez a sifroù an deskadurezh divyezhek prevez e c'hwec'h bro, anezho broioù ma vefe ezhomm ledanaat ar c'hinnig ha gwellaat e aozioù (bro Gwengamp, bro Ploermael pergen).

E 2009 e kresk an niver a skolidi e 70,2% eus ar c'humunioù, e-skoaz 64,1% warlene. Un digresk a verzer gant an niver a skolidi e 28% eus ar c'humunioù ma'z eus un hentad divyezhek d'an nebeutañ e 2009 ; chomet eo heñvel an niver-se e div gumun a-hend-all. Er Mor-Bihan emañ en e uhelañ an niver a gumunioù war zigresk c'hoazh er bloaz-mañ : e 39% eus kumunioù an departamant a zegemer un hentad divyezhek e tigrisk an niver a skolidi en distro-skol-mañ. Alies e klot an dra-se gant un digresk e sifroù an hentad prevez a zo pouezusoc'h en departamant-se eget er re all.

Gant **574 skoliad** eo **Roazhon** ar gumun a skoliata ar muiañ a skolidi divyezhek bremañ. Gounezet he deus Roazhon peder flas en ur ober 10 vloaz. Unan eus kumunioù Breizh enno ar muiañ a startijenn a-fet deskadurezh divyezhek eo Roazhon. Kollet he deus **Gwened** ar renk kentañ eta (559 skoliad). E penn ar roll edo abaoe 2001 ma oa bet staliet skolaj Diwan ar Mor-Bihan enni. E Roazhon eo e kaver an niver brasañ a skolidi divyezhek er c'hentañ derez ivez (468 skoliad e-skoaz 370 e Gwened). Dre-vras, pa renker ar c'humunioù diouzh sifroù ar c'hentañ derez eo kêrioù-penn departamantoù Breizh a zeu da gentañ (en urzh : Roazhon, Gwened, Naoned ha Kemper) nemet Sant-Brieg a erru d'ar 15^{vet} renk hepken⁵.

⁵ Gant stadegoù 10 kumun pobletañ Breizh emañ Sant-Brieg en eil renk e-keñver feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez memes tra (gw. p. 49).

Gwir wellaenn pe spanaenn ?

E 1977 e oa bet digoret skol divyezhek kentañ Breizh. **E 2009, evit an 32^{vet} distro-skol da-heul, e talc'h ar rouedad skolioù d'en em zispakañ er vro ha kresk zo gant sifroù ar c'helenn divyezhek.** Tremen 13 000 skoliad zo bremañ.

Nec'het e vezed gant kresk gwanoc'h an deskadurezh divyezhek da bep distro-skol avat : bihanoc'h-bihanañ an niver a lec'hioù nevez, disteroc'h-disterañ kresk poblañs ar skolioù d'ar mare ma oad sañset mont war-raok da vat gant politikerezh yezh ar rannvro.

N'eo ket bras-bras an niver a lec'hioù nevez e 2009 c'hoazh, met muioc'h eget e 2008 zo bepred. Ha lec'hioù dasparzhet gwelloc'h int dreist-holl : digoradurioù zo gant pep hentad hag e pep departamant. Mont a ra ar c'hinnig war-raok eta, ha pa chomfe bihan war an hollad (n'eus atav nemet 6% eus ar skolioù kentañ derez o kinnig an deskadurezh divyezhek).

Goude bezañ bet o c'horrekaat dizehan e-pad 9 bloavezh diouzh renk koulz lavaret, e teu lusk en-dro gant kresk ar skolidi divyezhek. Distreiñ a ra feur bloaziek kresk ar skolioù divyezhek d'ar pezh e oa e 2007. E tost an holl zepartamantoù eo kreñvoc'h ar feur kreskiñ eget ar pezh a oa warlene, zo kaeroc'h. En desped da se, chom a reer gant unan eus kreskoù izelañ biskoazh an deskadurezh divyezhek memes tra.

Ar skolioù-mamm eo a gresk ar muiañ e 2009 : ne oa ket c'hoarvezet ken abaoe 2001 e vefe brasoc'h an niver a skolidi ouzhpenn er skolioù-mamm eget er skolioù-kentañ. Kement-se a dalvez eo liammet strizh kresk 2009 ouzh an digeriñ lec'hioù nevez ha neket ouzh ur c'hresk diabarzh naturel hepken. N'eo ken gwell a se evit an diorren er bloavezhioù da zont, gant ma vo kendalc'het da fonnusaat ar c'hinnig da bep distro-skol.

Aze emañ an dalc'h e gwirionez : **gwelloc'h eo dibarderioù distro-skol 2009 eget re 2008 ha dre-se ez eus un harz d'ar gorrekaat a oa bet stadet er bloavezhioù diwezhañ.** Kalonekaus eo kement-se met **chom a reer gant disoc'hoù gwall izel e-keñver istor an deskadurezh divyezhek.** Bresk eo ar wellaenn-se c'hoazh, ezhomm he deus da vezañ kadarnaet. Ken buan all e c'hellfe distreiñ war an tu fall e 2010. Ur wellaenn a oa bet e 2004 dija e gorrekadur diorren an deskadurezh divyezhek met ne oa bet nemet ur spanaenn a-benn ar fin.

Mont da 20 000 skoliad

Lakaet e oa bet da bal kaout 20 000 skoliad er c'hlasoù divyezhek a-benn 2010. Ne vo ket tizhet ar pal-se war-bouez 7 000 pe 6 000 skoliad (diouzh pe da vare e lakaer an termen e gwirionez). Talvoudus eo neuze studiañ pishoc'h emdroadur ar pemp bloavezh tremenet.

Gouzañvet en deus Diwan diwar nac'hadenn e enframmadur en deskadurezh publik e 2002, e meur a geñver. Goude bloavezhioù diaezik emañ bremañ oc'h adtapout nerzh a-drugarez da skoazell ar Rannvro ha d'ar politikerezh diorren kaset da benn gant ar gevredigezh. **Evit ar wech kentañ abaoe pell emañ ar c'hresk brasañ er skolioù-mamm gant Diwan.** Ezhomm a vo da zerc'hel d'al lusk kreskiñ-se er bloavezhioù da zont c'hoazh.

Nebeut a lec'hioù nevez a vez digoret gant an deskadurezh publik : daou lec'h nevez hepken zo bet da zistro-skol 2009 evel e 2008. Hag al lec'hioù-se zo frouezh stourm pennek ar gerent tra ma chom goulennoù all direspont (Sant-Stefan-Bregoloù ha Gwizien warlene, Pleiben ha skol Les Batignolles e Naoned er bloaz-mañ) pe gant ur respont etre (skol Merville en Orient warlene ha skol Bruz er bloaz-mañ). Well-wazh e chom kevatal feur kreskiñ an hentad publik d'ar pezh e oa e distro-skol 2004. N'eus keñver ebet etre lusk

an hentad publik e Breizh hag ar pezh a stader en Elzas pe e Norzheuskadi m'eo frammet an diorren.

Fonnusoc'h eo bet emdroadur an hentad divyezhek en deskadurezh prevez eget en deskadurezh publik : e 2005 (pa oa 15 vloaz) edo an hentad katolik war-nes kaout muioc'h a skolidi eget an hentad publik bet krouet 7 vloaz araozi. Ha pa vefe gorrekaet al lusk diorren bremañ hag e vefe serret lec'hioù zo a-wechoù e kendalc'h rouedad ha sifroù ar prevez da greskiñ. **Diouzh ar c'henfeurioù e chom brasoc'h ar c'hinnig ha feur ar skolidi divyezhek en deskadurezh prevez eget en deskadurezh publik.**

Raktresañ an digeriñ skolioù divyezhek

Adlañs an distro-skol-mañ a ziskouez deomp eo posupl kaout ur c'hresk sonnec'h ha pa ne vefe ket graet melloù strivoù evit se (2 lec'hienn nevez hepken evit pep hentad)

Kreñv e chom ar goulenn skolioù divyezhek. Muioc'h-mui a-du gant an deskiñ brezhoneg e sav poblañs Breizh : 77,5% e 1991, 80% e 1997 ha 86% e 2007⁶. **Ha danvez zo da glokaat-kalz rouedad ar skolioù divyezhek** : dre-vras, toulloù bras pe vrasoc'h a zeu war wel e kartenn Breizh pep hentad ha distank e chom ar c'hinnig er c'hêrioù bras (1 lec'hienn divyezhek publik e Brest, 2 e Kemper e-skoaz 13 e Strasbourg).

Ezhomm zo neuze da raktresañ an digeriñ ha da frammañ koskor ar gelennerien divyezhek. **Diskouez a ra skouer Elzas hag Ofis Publik an Euskareg eo posupl e Frañs raktresañ ha frammañ da vat ar c'hinnig kelenn divyezhek e-barzh ur politikerezh yezh publik gant kenlabour an holl gevelerien.** Gant un niver hollek a yezherien o kenderc'hel da zigreskiñ e vo ret tremen d'ul live kreskiñ kalz brasoc'h ma vez c'hoant da gas ar yezh war-raok. An dra-se a vo dae vras ar c'hwec'h vloaz da zont rak aze eo e c'hoarier amzer da zont ar yezh. Se eo a zlefe bezañ labour pennañ an Ofis Publik zo da vezañ krouet.

⁶ Broudic F., 2009. Parler breton au XXIe siècle – Le nouveau sondage de TMO-Régions. Sant-Tonan, 208 pajenn.

Stagadennoù gant sifroù Distro-skol 2009

An niver a skolioù divyezhek dre zepartamant ha dre live - Distro-skol 2009

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad
Aodoù-an-Arvor	32	31	6	1	70
Penn-ar-Bed	69	66	15	5	155
Il-ha-Gwilen	12	11	2	1	26
Liger-Atlantel	6	5	2		13
Mor-Bihan	56	53	14	1	124
Breizh	175	166	39	8	388

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolioù divyezhek e Breizh dre hentad ha dre live - Distro-skol 2009

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad
Skolioù Diwan	39	37	6	1	83
Skolioù publik	74	69	16	6	165
Skolioù katolik	62	60	17	1	140
Hollad	175	166	39	8	388

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre live - Distro-skol 2009

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad	Kresk bloaziek	Feur kreskiñ
Aodoù-an-Arvor	854	897	306	44	2 090	106	5,31%
Penn-ar-Bed	2 300	2 318	801	316	5 735	375	7,00%
Il-ha-Gwilen	444	399	90	26	957	99	11,51%
Liger-Atlantel	197	209	52		458	34	8,02%
Mor-Bihan	1 671	1 684	410	17	3 768	134	3,67%
Breizh	5 466	5 507	1 659	403	13 035		
Kresk bloaziek	335	234	157	22		748	
Feur kreskiñ	6,53%	4,44%	10,45%	5,77%			6,09%

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolidi divyezhek dre hentad ha dre live - Distro-skol 2009

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Skolajoù	Liseoù	Hollad	Kresk bloaziek	Feur kreskiñ
Skolioù Diwan	1 048	1 163	719	237	3 167	137	4,52%
Skolioù publik	2 524	2 307	457	135	5 424	408	8,13%
Skolioù katolik	1 894	2 037	482	31	4 444	203	4,79%
Hollad	5 466	5 507	1 659	403	13 035		
Kresk bloaziek	335	234	157	22		748	
Feur kreskiñ	6,53%	4,44%	10,45%	5,77%			6,09%

■ Kresk ■ Digresk

An niver a skolidi divyezhek dre zepartamant ha dre hentad - Distro-skol 2009

	Skolioù Diwan	Skolioù publik	Skolioù katolik	Hollad	Kresk bloaziek	Feur kreskiñ
Aodoù-an-Arvor	558	1 146	397	2 101	106	5,31%
Penn-ar-Bed	1 780	2 386	1 569	5 735	375	7,00%
Il-ha-Gwilen	120	543	296	959	99	11,51%
Liger-Atlantel	234	197	27	458	34	8,02%
Mor-Bihan	475	1 152	2 155	3 782	134	3,67%
Breizh	3 167	5 424	4 444	13 035		
Kresk bloaziek	137	408	203		748	
Feur kreskiñ	4,52%	8,13%	4,79%			6,09%

■ Kresk ■ Digresk

Renkadur ar broioù diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2009

	Diwan	Publik	Katolik	Hollad	Kresk bloaziek
Bro Brest	807	1201	950	2958	152
Bro Gerne	464	738	124	1326	125
Bro Kêr-Wened	228	249	774	1251	5
Bro Treger ha Goueloù	157	712	149	1018	50
Bro an Oriant	98	587	264	949	80
Bro Montroulez	193	296	440	929	76
Bro Kornôg Kreiz-Breizh	316	288	232	836	5
Bro Pondi	92	102	482	676	12
Bro Roazhon	120	438	108	666	43
Bro Gwengamp	261	247	115	623	59
Bro an Alre	57	119	405	581	69
Bro Naoned	175	197	27	399	38
Bro Ploermael	0	54	167	221	-16
Bro Redon	0	74	142	216	37
Bro Sant-Brieg	89	91	19	199	0
Bro ar Briver	53	0	0	53	-10
Bro Dinan	51	0	0	51	-2
Bro Gwitreg	0	0	46	46	11
Bro Sant-Maloù	0	31	0	31	8
Bro Kreiz Liger-Atlantel	6	0	0	6	6

■ Kresk ■ Digresk

Renkadur an DFKE diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2009

	Diwan	Publik	Prevez	Hollad	Kresk bloaziek
KTK Bro Kêr-Wened	198	216	725	1139	2
K-kêr Brest Meurgêr ar Mor	376	448	252	1076	68
KTK Bro an Oriant	98	496	264	858	83
KK Plabenneg hag an Aberioù	34	333	292	659	-1
KTK Meurgêr Roazhon	112	438	108	658	40
KTK Lannuon-Treger	113	422	69	604	32
KTK Kemper Kumuniezh	296	206	51	553	38
KK Bro an Alre	57	119	279	455	61

KK ar Poc'hêr	316	71	55	442	16
KK Bro Landerne-Daoulaz	53	319	63	435	37
KK Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù	207	0	225	432	-1
K-kêr Naoned	175	197	27	399	38
KK Bro Landivizio	70	62	181	313	41
KK Bro an Hirwazh	77	101	118	296	57
Gwengamp Kumuniezh	85	98	89	272	-16
KK Bro Gemperle	108	137	0	245	42
KK Bro Bondi	60	47	134	241	14
KK Bro Redon	0	74	142	216	37
KK Bae ar C'hernig	0	44	170	214	3
KK Bro Leon	71	51	89	211	11
KK Bro Voulvriag	176	0	26	202	37
KTK Bro Sant-Brieg	89	91	19	199	0
KK Kreiz Breizh	0	77	114	191	3
KTK Bro Vontroulez	52	139	0	191	21
KK Bro Logunec'h	0	0	174	174	3
KK Su ar Vro Vigoudenn	0	118	53	171	-1
KK Bro Josilin	0	0	167	167	-14
KK Bro Vaod	32	55	36	123	3
KK Bro Douarnenez	0	110	0	110	-6
KK an Teir Stêr	0	56	50	106	1
KK Bro ar Roue Morvan	0	41	63	104	-16
KK Beg ar C'hra	23	76	0	99	19
KK "Pempoull Goueloù"	21	71	0	92	2
KK Bro Ploue, ag ar Skorf d'ar Blavezh	0	91	0	91	-3
Mourieg	0	0	89	89	-7
KK Kreiz Bro Dreger	0	87	0	87	-6
KK Bro Venac'h	0	85	0	85	4
KK Konk-Kerne	37	47	0	84	-2
KK Stêr an Intel	0	0	82	82	7
KK Bro-C'hlarg	0	70	0	70	17
KK Gorre ar Vro Vigoudenn	0	50	20	70	27
KK Kerne-Uhel	0	52	0	52	5
KK Bro Vear	0	51	0	51	21
KK Dinan	51	0	0	51	-2
KK al Loc'h	0	0	49	49	3
KK Sant-Yann-Brevele Kumuniezh	0	0	49	49	-1
KTK Gwitreg-Kumuniezh	0	0	46	46	11
KK Aod ar Meurvein	0	0	44	44	1
KK Gourenez Kraozon	34	0	0	34	-6
KK Gourenez Rewiz	0	33	0	33	1
KK Bro Bloermael	0	31	0	31	-2
KTK Bro Sant-Maloù	0	31	0	31	8
KK Bro Gistreberzh	30	0	0	30	-1
Perroz-Gireg	0	0	30	30	2
KK ar Yeun Elez	0	28	0	28	1
KTK Kab Atlantel	27	0	0	27	-9

KK Arvor ar Stêr-Aon	26	0	0	26	-2
KTK Bro Sant-Nazer hag hec'h Aber	26	0	0	26	-1
KK Bro Gastellin hag ar Porzhe	23	0	0	23	10
KK Bro Maoron ha Breselien	0	23	0	23	0
KK Kanton Kallag	0	19	0	19	-4
KK an Trev	0	13	0	13	13
KK Traoñ an Il	8			8	3
KK al Liger hag an Erv	6	0	0	6	6

■ Kresk ■ Digresk

K.K. : Kumuniezh kumunioù, K-kêr : Kumuniezh-kêr, K.T.K. : Kumuniezh tolpad-kêrioù

Renkadur ar c'humunioù diouzh an niver a skolidi divyezhek enno - Distro-skol 2009

Renk	Kumun	Dep.	Lec'h kentañ e	Diwan	Publik	Prevez	Hollad	Kresk bloaziek
1	Roazhon	35	1977	112	354	108	574	21
2	Gwened	56	1993	198	82	279	559	-5
3	Kemper	29	1977	296	141	51	488	36
4	Karaez-Plougêr	29	1985	316	71	55	442	16
5	Lannuon	22	1978	93	288		381	19
6	Naoned	44	1981	155	197	27	379	27
7	Lanniliz	29	1995		242	117	359	11
8	Plougastell-Daoulaz	29	1995		143	192	335	27
9	Landerne	29	1987	53	215	63	331	22
10	Lesneven	29	1981	118		189	307	13
11	Brest	29	1978	193	98		291	15
12	Teiz	56	1995		69	186	255	-8
13	Plabenneg	29	1991	34		175	209	20
14	Lannarstêr	56	1988		193		193	-9
15	Gwengamp	22	1981	85	13	89	187	-14
16	Pondi	56	1984	60	47	80	187	1
17	Releg-Kerhuon (ar)	29	1988	183			183	6
18	Oriant (an)	56	1978	70	105	8	183	19
19	Sant-Brieg	22	1979	89	91		180	4
20	Plijidi	22	1995	176			176	36
21	Sant-Teve	56	2002		37	137	174	1
22	Redon	35	1997		74	99	173	-6
23	Langedig	56	2001		38	129	167	18
24	Kastell-Paol	29	1978	71		89	160	5
25	Kleder	29	1991		44	98	142	11
26	Rostrenenn	22	1984		77	62	139	1
27	Henbont	56	1997			127	127	6
28	Logunec'h	56	2003			127	127	10
29	Gwiseni	29	1990	89		36	125	-14
30	Brec'h	56	1989		119		119	29
31	Landivizio	29	2000			118	118	14
32	Ploveur	29	1993		118		118	-3
33	Gwitalmeze	29	1977	50		62	112	-4
34	Montroulez	29	1988	52	60		112	6
35	Douarnenez	29	1989		110		110	-6

36	Plunered	56	1998			103	103	21
37	Plounevez-Moedeg	22	2002	23	76		99	19
38	Plistin	22	1999		98		98	7
39	Pleuwigner	56	1994			94	94	11
40	Josilin	56	2003			93	93	-13
41	Pempoull	22	1984	21	71		92	2
42	Plougerne	29	1996		91		91	5
43	Ploue	56	1994		91		91	-3
44	Mourieg	56	2000			89	89	-7
45	Kawan	22	1987		87		87	-6
46	Baod	56	1991	32	55		87	5
47	Pabu	22	1991		85		85	-2
48	Bruz	35	2003		84		84	19
49	Gouenoù	29	2004		83		83	23
50	Gwidel	56	1991		82		82	5
51	Lokoal-Mendon	56	1994			82	82	7
52	Gwegon	56	2000			74	74	-1
53	Loperc'hed	29	2004		72		72	11
54	Ploueskad	29	1999			72	72	-8
55	Brieg	29	2006		70		70	17
56	Kommanna	29	1977	70			70	1
57	Banaleg *	29	1982	50	18		68	21
58	Gourin	56	1994		41	26	67	-7
59	Erge-Vras (an)	29	2002		65		65	2
60	Pleskob	56	2005			64	64	0
61	Gwipavaz	29	1995		63		63	-7
62	Plouvorn	29	2006			63	63	24
63	Santez-Anna-Wened	56	1994			63	63	-1
64	Sizun	29	2004		62		62	2
65	Tremeven	29	2005		62		62	8
66	Plouzane	29	2003		61		61	5
67	Gwiler-Leon	29	2002			60	60	-1
68	Surzhur	56	2007			59	59	6
69	Kemperle	29	1989	58			58	12
70	Skaer	29	1998		57		57	1
71	Alre (an)	56	1999	57			57	4
72	Perwenan	22	1999		56		56	-2
73	Plouarzhel	29	2006			56	56	16
74	Pont-'n-Abad	29	1995			53	53	2
75	Kastell-Nevez-ar-Faou	29	2003		52		52	5
76	Bear	22	2007		51		51	21
77	Dinan	22	2000	51			51	-2
78	Plougonevelen	29	2007		51		51	12
79	Rosko	29	2002		51		51	6
80	Landreger	22	1997			50	50	3
81	Milizag	29	2006		50		50	14
82	Plozeved	29	2007		50		50	7
83	Rospezh	22	2004			49	49	3
84	Begnen	56	2000			49	49	-1
85	Gregam	56	1996			49	49	3
86	Louergad	22	1998		47		47	3

87	Konk-Kerne	29	1999		47		47	6
88	Pluverin	56	2005			47	47	-7
89	Lanneur	29	2004		46		46	8
90	Gwitreg	35	2007			46	46	11
91	Klegereg	56	2004			45	45	4
92	Pont-Skorf	56	2001		45		45	9
93	Karnag	56	1992			44	44	1
94	Lokmaria-Redon *	35	2009	0	0	43	43	43
95	Pariz	75	2004	42			42	-4
96	Benac'h	22	1998		38		38	1
97	Tregon	29	1982	37			37	-8
98	Faoued (ar)	56	1993			37	37	-9
99	Tregastell	22	1989		36		36	2
100	Mêlrant	56	2006			36	36	-2
101	Kraozon	29	1989	34			34	-6
102	Pleiber-Krist	29	2008		33		33	7
103	Kewenn	56	2006		33	0	33	7
104	Sarzhav	56	1993		33		33	1
105	Daoulaz	29	2006		32		32	4
106	Sant-Maloù	35	2000		31		31	8
107	Ploermael	56	1994		31		31	-2
108	Perroz-Gireg	22	2007			30	30	2
109	Kistreberzh	56	2000	30			30	-1
110	Groñvel	22	1998			28	28	1
111	Sant-Riwal	29	1983		28		28	1
112	Ploveren	56	2008		28		28	8
113	Rianteg *	56	2009	28	0	0	28	28
114	Lokournan	29	2008	27			27	19
115	Gwenrann	44	1999	27			27	-9
116	Boulvriag	22	2005			26	26	1
117	Faou (ar)	29	1998	26			26	-2
118	Sant-Nazer	44	1991	26			26	-1
119	Mêl-Karaez	22	2004			24	24	1
120	Kastellin	29	2007	23			23	10
121	Maoron	56	2000		23		23	0
122	Louaneg	22	2006	20			20	3
123	Ploubêr	22	2000			20	20	-2
124	Ploneour-Lanvern *	29	2009	0	0	20	20	20
125	Sant-Ervlan	44	2008	20			20	11
126	Bulad-Pestivien	22	2007		19		19	-4
127	Tregaeg	22	2004			19	19	-4
128	Pluvergad	56	1996			19	19	-3
129	Pleuzal *	22	2009		13		13	13
130	Noal-Pondi *	56	2009		0	9	9	9
131	Magoer	35	2008	8			8	3
132	Saveneg *	44	2009	6	0	0	6	6
	Plouvien **	29	1996			0	0	-37

■ Kresk ■ Digresk

* Lec'h nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2009

** Lec'h serret da zistro-skol 2009




Stadegoù ar c'helenn divyezhek evit ar bloavezh-skol 2008/2009

- **1,45%** eo an dregantad a **skolidi divyezhek** a oa er c'helenn dre-vras e Breizh e 2008/2009. Ar feur hollek-se zo kresket eus 0,07 poent e-keñver 2007/2008. Kevatal eo ar c'hresk-se ouzh ar re a oa bet bep bloaz abaoe 2006, daoust ma n'eus bet digoret nemet 4 lec'h nevez da zistro-skol 2008 e-keñver 8 e 2007 ha 10 e 2006. Gant se, uhel eo lodenn **ar c'hresk diabarzh** e kresk 2008/2009.
- Ret eo keñveriañ ar feur-se (1,45%) ouzh **feur izel c'hoazh ar skolioù ma vez kinniget ar c'helenn divyezhek** e gwirionez : 6% eus an holl skolioù.
- Gant ar stadegoù e chom **brasoc'h ar c'hinnig hag ar feur skoliata** en div yezh **er skolioù prevez katolik** eget er skolioù publik : ur c'hinnig divyezhek a zo e 5,5% eus skolioù prevez Breizh e-skoaz 4,4% eus ar skolioù publik, da skouer.
- **Tremen 4%** eo dregantad an deskadurezh divyezhek er c'hentañ derez en daou zepartamant m'emañ ar c'helenn divyezhek en e greñvañ : **Penn-ar-Bed** (4,71%, +0,27 poent) hag ar **Mor-Bihan** (4,3%, +0,08 poent). Diorroetoc'h eo ar c'hinnig en departamantoù-se : ouzhpenn 10% eus ar skolioù kentañ derez zo un hentad divyezhek enno.
- **7,7%** eo dregantad ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e **bro Treger ha Goueloù** (a zo e penn a-raok ar broioù e-keñver feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez). E bro Kornôg Kreiz-Breizh eo emañ ar feur eus ar skol-vamm d'al lise en e uhelañ avat gant 4,99% (a-drugarez d'al lise Diwan peurgetket) tra ma sav da 4,81% e bro Treger ha Goueloù.
- Pa renker an DFKEoù diouzh an dregantad a vugale skoliataet en deskadurezh divyezhek er c'hentañ derez ez eo **Kumuniezh kumunioù (KK) Kreiz Treger** a dizh ar feur uhelañ gant **14,8%**.
- Kenderc'hel a ra an niver a gumunioù enno **tremen 10% a skolidi divyezhek** da greskiñ : 65 int e 2008/2009 e-skoaz 62 e 2007/2008. Diskouez a ra kement-se e wrizienn an deskadurezh divyezhek er c'humunioù ma'z eus ur c'hinnig.
- E-keñver 2007/2008 eo **aet war-raok pouez ar c'helenn divyezhek e 61% eus ar c'humunioù ma'z eus ur c'hinnig** e 2008/2009.

Gwirvoud ar c'hinnig war an dachenn

Dregantad a skolioù kentañ derez enno un hentad divyezhek dre zepartamant - Bloavezh-skol 2007/2008



Alc'hwez lenn : en ur c'hlas divyezhek e c'heller skoliata e vugel e 4,4% eus ar skolioù publik, 5,5% eus skolioù an deskadurezh prevez katolik, 100% eus ar skolioù Diwan hag e 6% eus an holl skolioù.

Kentelius eo ar grafiek-mañ evit ar pezh a denn d'an hentadoù par-ouzh-par kentoc'h. Gant ar sifroù kriz e vez brasoc'h lodenn an hentad publik (krouet e 1983) eget hini an hentad prevez katolik (krouet e 1990). Met muioc'h a skolioù hag a skolidi zo gant an deskadurezh publik dre-vras (skoliata a ra 6 skoliad diwar 10 well-wazh e Breizh). **Gant ar stadegoù e verzer eo brasoc'h ar c'hinnig er skolioù prevez katolik eget er skolioù publik en holl zepartamantoù nemet en Il-ha-Gwilen.**


Er Mor-Bihan eo emañ an diforc'h en e vrasañ (3 foent) etre ar c'hinnig er skolioù publik hag ar c'hinnig er skolioù prevez. Diskouez a ra ar skeudenn-mañ **pegen gwan eo ar c'hinnig divyezhek publik ha prevez en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel.** En departamant diwezhañ-se, estreget Diwan, n'eus kinnig ebet er-maez eus kêr Naoned.

6% eus skolioù kentañ derez Breizh a ginnig an deskadurezh divyezhek. **Unyezhek gallek e chom 94 % eus ar skolioù c'hoazh.** Diouzh an departamant hag an hentad e c'haller, diouzh ar gwellañ (Penn-ar-Bed ha Mor-Bihan), kavout ul lec'h divyezhek en ur skol diwar zek.

Evit keñveriañ, en Elzas ez eus un hentad divyezhek e 14,4% eus ar skolioù. Ar feur a sav da 54% e Norzheuskadi a-drugarez da labour Ofis Publik an Euskareg.

Poblañs skol a denn gounid eus ar c'hinnig kelenn divyezhek

Emdroadur keñveriet feur ar c'helell divyezhek galleg-yezh rannvro er c'hentañ derez e Breizh, en Elzas hag e Norzheuskadi etre 1999/2000 ha 2008/2009




Well-wazh, kreskiñ a ra dregantad ar skolidi kentañ derez er c'helell divyezhek eus 1,5 poent bep bloaz e Norzheuskadi, 0,7 poent en Elzas ha 0,1 poent e Breizh.

N'eo ket souezhus e vefe ken bras an diforc'h etre an teir yezh pa vuzulier ar c'hinnig (gwelet ar pennad a-us) hag ar fed eo gorrekoc'h an digeriñ lec'hioù nevez e Breizh. Da skouer, etre 2005 ha 2008, en ur ober pevar distro-skol, ez eus bet digoret 25 lec'h nevez e Norzheuskadi (da lavaret eo war tachenn un hanter departamant), tra ma n'eus bet nemet 31 war holl zepartamantoù Breizh.


A vloaz da vloaz e vrasa an troc'h etre an teir rannvro. Kentelius eo ar geñveriadenn gant Elzas pergen : da 2,8 e save darempred feurioù an div rannvro e 1999 (da lavaret eo e oa feur Elzas 2,8 gwech brasoc'h eget hini Breizh) ; tremenet eo da 4,2 e 2008.

Emdroadur feur ar c'heleñn divyezhek dre live e Breizh etre 1999/2000 ha 2008/2009



D'al lise ez eer 9 bloavezh goude bezañ en em gavet er skol-gentañ. Setu, ma vefe aozet ar c'hinnig diouzh ar gwellañ, e tlefe feur ar c'heleñn divyezhek e liseoù 2008 (0,23%) bezañ kevatal d'ar pezh a oa e skolioù-kentañ 1999 (0,84%). Sklaer eo n'ez a ket diorren an hentadoù en eil derez gant ar memes lusk hag er c'hentañ derez. Etre 1999 ha 2008 eo kresket an diforc'h kinnig etre ar c'hentañ hag an eil derez.


Feur ar c'heleñn divyezhek dre hentad ha dre live - Bloavezh-skol 2008/2009



Er c'hentañ derez emañ an darn vrasañ eus ar skolidi. En holl liveoù eo uheloc'h ar feur skoliata en div yezh en deskadurezh prevez katolik eget en deskadurezh publik, nemet el liseoù. Brezhonek eo holl skolioù Diwan a-hend-all.

An departamantoù

Pouez ar c'heleñn divyezhek e poblañs skol ar c'hentañ derez dre zepartamant - Bloavezh-skol 2008/2009




E kornôg Breizh emañ pouez ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez en e greñvañ. **Kresket eo ar sifroù en holl zepartamantoù** met en e vrasañ emañ ar c'hresk e **Penn-ar-Bed**, da lavaret eo en departamant dezhañ ar feur uhelañ dija. **Kadarnaat a ra ar soñj ez eus un doare heligentañ pa vez bras ar c'hinnig.**

Kresket e oa kement feur an deskadurezh divyezhek e kentañ derez ar **Mor-Bihan** er bloavezhioù diwezhañ m'edo war-nes bezañ kevatal da hini Penn-ar-Bed (ma neket uheloc'h egeti). Hogen, gant gorrekadur kresk an hentad divyezhek katolik, dezhi ur pouez dreist er Mor-Bihan, e adtap Penn-ar-Bed un tamm eus e lañs abaoe 2007.

Splann eo ez eus dale gant departamant **Aodoù-an-Arvor** e-keñver an daou zepartamant-se. Disoc'h an diouer a glasoù digoret en departamant-se e-kerzh an dek vloaz tremenet eo an dilañs-se ivez. Da zistro-skol 2008 c'hoazh ne oa bet lec'h nevez ebet digoret ennañ e-keñver daou e Penn-ar-Bed hag unan er Mor-Bihan.

E **departamantoù ar reter** e chom izel feurioù ar c'heleñn divyezhek abalamour d'ur c'hinnig re strizh. N'eus bet digoret nemet daou lec'h en daou zepartamant-se etre 2004 ha 2008. Koulskoude, pa vez krouet un hentad, e vod buan-tre un niver bras a skolidi. Ezhomm zo da lakaat evezh war emdroadur ar c'hinnig en Il-ha-Gwilen hag el Liger-Atlantel neuze, dreist-holl pa ouzer **emañ tremen an hanter eus skolidi Breizh o chom enno.**

Pouez ar c'helenn divyezhek e pep live kelenn e pep departamant - Bloavezh-skol 2008/2009



Feur ar c'helenn divyezhek dre zepartamant ha dre live - Bloavezh-skol 2008/2009

	Skolioù-mamm	Skolioù kentañ	Ishollad ar c'hentañ derez	Emdroadur e-keñver 2007/2008	Skolajoù	Liseoù	Hollad
Aodoù-an-Arvor	3,43%	2,49%	2,86%	+0,05	0,99%	0,19%	1,88%
Penn-ar-Bed	5,92%	3,89%	4,71%	+0,27	1,79%	0,88%	3,20%
Il-ha-Gwilen	0,87%	0,61%	0,71%	+0,03	0,17%	0,06%	0,45%
Liger-Atlantel	0,36%	0,25%	0,29%	+0,01	0,04%		0,17%
Mor-Bihan	5,24%	3,68%	4,30%	+0,08	1,12%	0,09%	2,70%
Breizh	2,75%	1,86%	2,21%	+0,07	0,71%	0,23%	1,45%

■ Kresk ■ Digresk

A vloaz da vloaz e stader eo brasoc'h kresk feur ar c'helenn divyezhek en departamantoù m'eo uhel dija, anezho an departamantoù m'emañ ar c'hinnig en e vrasañ ivez, evel-just. Evit 2008/2009 eo gwir an dra-se evit Penn-ar-Bed muioc'h c'hoazh eget evit ar re all : e skolioù-mamm an departamant, ez eo kresket ar feur eus tost un hanter poent e-keñver 2007/2008, da lavaret eo un dekvedenn ouzhpenn en ur ober bloaz (ha kement-se gant div skol nevez nemetken, ar pezh a ziskouez ez eus lusk gant ar skolioù kozh ivez).


An eil anadenn a bouez eo e koller lusk er c'hentañ derez un tamm dre-holl e-keñver ar bloaz a-raok : peurliesañ ne vez ket ken bras kresk ar feurioù etre 2007/2008 ha 2008/2009 ha ma oa bet etre 2006/2007 ha 2007/2008. Liammet eo an dra-se ouzh



an diouer a zigoradurioù e distro-skol 2008. Ar feurioù kreskiñ a zalc’h mat a-walc’h e Penn-ar-Bed memes tra, er c’hontrol eus ar pezh a c’hoarvez er Mor-Bihan.

En departamant-se e tigrask ar feurioù skoliata en eil derez ouzhpenn-se. Disoc’h an diaesterioù a vez d’ar c’hendalc’h en eil derez eo. Mod all n’ez a ket ar sifroù war-raok ken buan ha ma tlefent ober en departamantoù all kennebeut.

Emdroadur feur ar c’helenn divyezhek er c’hentañ derez etre 1999/2000 ha 2008/2009




Ar Mor-Bihan eo departamant kornôg Breizh m’eo kresket ar muiañ feur ar c’helenn divyezhek er c’hentañ derez etre 1999 ha 2008. Daoust da se e verzer e vez dalc’het gwelloc’h d’ar c’hresk bloaziek e Penn-ar-Bed ma’z eus bet digoret muioc’h a skolioù er bloavezhioù diwezhañ. Dre-vras eo splann efed an digoradurioù (pe an diouer a zigoradurioù) war emdroadur dregantad ar skolidi divyezhek e pep departamant. Kompren a reer gwelloc’h neuze, da skouer, en abeg da betra eo chomet boud feur ar skolidi divyezhek e departamant al Liger-Atlantel abaoe 2002 : ne oa bet digoradur ebet eno abaoe 1999.



Ar broioù

Pouez ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez dre vro - Bloavezh-skol 2008/2009



Kadarnaet eo emañ ar c'heleñn divyezhek en e greñvañ e gwalarn hag e kreiz Breizh. E 6 eus an 29 bro emeur tremenet en tu all da 5% eus ar vugale en deskadurezh divyezhek bremañ. Evel-se e oa kont e 2007/2008 c'hoazh. **Nevezenti zo koulskoude rak div vro nevez zo war vevenn ar 6%** : bro Kornôg Kreiz-Breizh ha bro Montroulez. A-hend-all, ne chom mui nemet dek bro hep tamm kinnig deskadurezh divyezhek ebet enno.

Gant bro Treger ha Goueloù emañ ar feur uhelañ atav (7,7%, da lavaret 0,1 poent ouzhpenn e-keñver 2007/2008). E penn a-dreñv broioù kornôg Breizh emañ bro Gerne atav (3,1%) : disoc'h an nebeud a lec'hioù nevez krouet eno er bloavezhioù diwezhañ eo a weler c'hoazh aze. Dregantad izelañ Breizh-Izel eo. Tremenet eo bro Gerne dreist da vro Bloermael memes tra evit ar wech kentañ abaoe 2003. Disoc'h kresk ar skolioù krouet er bloavezhioù diwezhañ eo : Plozeved, Brieg, Kastellin, Tremeven. Danvez ur c'hresk brasoc'h er bloavezhioù da zont e c'hellfe bezañ gant ma vo dalc'het d'ul lusk digeriñ uhel.

Heverk a-walc'h eo feurioù ar c'heleñn divyezhek e broioù Redon, Ploermael ha Roazhon pa ouzer int maget gant nebeut-tre a skolioù. E lec'h all e Breizh-Uhel e chom izel ar feurioù pa vezont stag ouzh skolioù en o-unan hag o defe ezhom da vezañ nerzhekaet gant krouidigezh lec'hioù all tro-war-dro.

Keleñn divyezhek dre vro ha dre live (urzhiat diouzh pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez) - Bloavezh-skol 2008/2009

	Skol-vamm	Skol gentañ	Ishollad ar c'hentañ derez	Emdroadur e-keñver 2007/2008	Skolaj	Lise	Hollad
Bro Treger ha Goueloù	9,8%	6,4%	7,75%	0,14%	1,5%	0,8%	4,8%
Bro Pondi	7,5%	6,0%	6,61%	0,10%	0,9%		4,0%
Bro Kornôg Kreiz Breizh	7,2%	5,2%	5,99%	0,35%	0,6%	8,8%	5,0%
Bro Montroulez	7,2%	5,1%	5,97%	0,28%	0,8%		3,7%
Bro an Alre	7,3%	4,4%	5,59%	0,19%	0,4%		3,4%
Bro Brest	6,7%	4,5%	5,40%	0,27%	2,9%	0,3%	3,7%
Bro Kêr-Wened	5,9%	4,0%	4,78%	0,33%	1,9%		3,1%
Bro Gwengamp	5,2%	4,1%	4,52%	0,05%	3,6%		3,8%
Bro an Oriant	4,3%	2,8%	3,38%	-0,15%	1,1%	0,2%	2,1%
Bro Gerne	4,2%	2,4%	3,15%	0,24%	1,0%	0,1%	2,0%
Bro Ploermael	3,1%	2,6%	2,80%	-0,17%	0,7%		1,8%
Bro Redon	1,6%	1,6%	1,62%	-0,05%	0,3%		1,0%
Bro Roazhon	1,4%	1,0%	1,16%	0,06%	0,3%	0,1%	0,7%
Bro Sant-Brieg	0,9%	0,9%	0,92%	0,03%	0,1%		0,5%
Bro Naoned	0,8%	0,6%	0,65%	0,04%	0,1%		0,3%
Bro Dinan	0,6%	0,4%	0,49%	0,02%			0,3%
Bro ar Briver	0,3%	0,2%	0,28%	0,00%			0,2%
Bro Gwitreg	0,6%	0,1%	0,27%	0,10%			0,2%
Bro Sant-Maloù	0,1%	0,1%	0,14%	-0,04%			0,1%

■ Kresk ■ Digresk ■ An tri feur uhelañ evit pep live-skol

E bro Kornôg Kreiz-Breizh eo kresket ar muiañ ar feur keleñn divyezhek e 2008/2009. Gant se e teu a-benn ar vro-se da dapout an trede plas er renkadur amañ a-us digant bro Montroulez. Er memes mod, **bro Kêr-Wened zo tremenet dirak bro Gwengamp. Broioù Penn-ar-Bed a ginnig kreskoù brazik ivez.** Ur c'hresk bihan a-walc'h zo gant ar broioù m'emañ feur ar c'helenn divyezhek en e greñvañ : bro Treger ha Goueloù (+0,15 poent e-skoaz +0,53 bloaz a-raok) ha bro Pondi (+0,10 e-skoaz +0,28 bloaz a-raok), div vro ma n'eus ket bet krouet a-walc'h a lec'hioù nevez.

E penn all al listenn, feur ar c'helenn divyezhek e kentañ derez bro Gwitreg (enni ur skol divyezhek abaoe distro-skol 2007 nemetken) zo tremenet dreist da hini bro Sant-Maloù (enni ur skol divyezhek abaoe distro-skol 2000).

O sellet pishoc'h ouzh ar munudoù e verzer **emañ tost holl feurioù bro an Oriant o tigrskiñ.** Liammet eo an dra-se ouzh diviz skol divyezhek prevez kêr an Oriant zo bet serret e 2008 peurgetket.


Kreskiñ a ra en-dro e 2008/2009 an dregantadoù e broioù poblet evel hini Naoned pe Sant-Brieg. Met gwall vihan e chom an emdroadurioù e broioù reter Breizh dre-vas dre ziouer a lec'hioù keleñn nevez.

Izeloc'h eo, dre-vras, ar c'hresk a stader er broioù hag ar pezh a oa e 2007/2008 (da skouer ne gontar nemet peder bro gant ur c'hresk en tu all da 0,25 poent tra ma oant eizh e 2007/2008). Liammet-strizh ouzh an diouer a zigoradurioù nevez e 2008 eo gwanded an emdroadur-se.

Hogen, n'eo ket souezh e chomfe bihan an emdroadurioù er broioù (0,35 poent d'ar muiañ, a-boan uheloc'h eget ar pezh a stader gant an departamantoù), anezho tachennoù ledan a-walc'h c'hoazh. Splannoc'h eo an emdroadurioù pa studier an DFKE.

An DFKE

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre DFKE - Bloavezh-skol 2008/2009



Pa dremener d'ul live melestradurel tostoc'h d'an dachenn e verzer ez eus ur c'hinnig divyezhek e 43,6% eus DFKE⁷ Breizh (61 diwar 140). Ur framm etrekumunel nevez a zegemer an deskadurezh divyezhek abaoe 2008 : Kumuniezh kumunioù (KK) Traoñ an Il.

Merzout a reer pegen troc'h-didroc'h eo ar c'hinnig kelenn divyezhek e kornôg Breizh ivez. Digempouez-tre eo en Aodoù-an-Arvor dreist-holl ma kaver un nebeud DFKE dezho ur feur uhel a-walc'h (tremen 8% peurliesañ) e-skoaz peurrest an departamant

⁷ Diazevadurioù Foran a Genlabour Etrekumunel (EPCI e galleg).

ma n'eus tost kinnig ebet. Er Mor-Bihan, en enep, eo heverk KK Bro Josilin dezhi unan eus feurioù uhelañ an deskadurezh divyezhek er c'hentañ derez (13,2%).

Kentoc'h war ar maez emañ an DFKEoù m'eo dereat pouez ar c'helenn divyezhek (Kreiz-Breizh, Bro-Dreger hag aodoù Bro-Leon). Liammet eo ouzh poblañs rouesoc'h ar skolioù eno : n'eo ket ken niverus ar skolioù ha pa vez un hentad divyezhek en unan anezho ez eus danvez er stadegoù da bignat buanoc'h.

Ur c'hinnig divyezhek bennak a zo e tost holl DFKEoù kornôg Breizh. Koulskoude, etrekumunelezhioù hep skol divyezhek ebet zo c'hoazh er c'horn-se : K.K. Bro ar C'hab, K.K. Bro Fouenant, K.K. Bro Bleiben, K.K. Gourenez Lezardrev, K.K. an Trev, K.K. Bro Lannolon-Plouha, K.K. Blavezh, Gwelmeur hag ar Mor, K.K. an Teir Stêr (56). E Bro Dreger e kaver ivez stok-ha-stok DFKEoù ganto feurioù e-touez re uhelañ Breizh ha DFKEoù all hep tamm kinnig divyezhek ebet.

*Kelenn divyezhek dre DFKE ha dre live (urzhiat diouzh ar pouez er c'hentañ derez)
- Bloavezh-skol 2008/2009*

	Skol-vamm	Skol-gentañ	Ishollad kentañ derez	Emdroadur e-keñver 2007/2008	Skolaj	Lise	Hollad
KK Kreiz Bro Dreger	17,5%	12,7%	14,8%	2,09%			14,8%
KK Bae ar C'hernig	13,1%	14,2%	13,7%	0,02%	6,3%		11,7%
KK Bro Josilin	14,3%	12,6%	13,2%	-1,08%	4,1%		9,4%
KK Bro Venac'h	15,5%	11,4%	13,0%	-0,66%			10,3%
KK ar Poc'hêr	13,9%	11,1%	12,2%	0,03%	2,4%	22,5%	13,1%
KK Beg ar C'hra	15,5%	9,6%	12,2%	2,11%			9,6%
KK Plabenneg hag an Aberioù	13,0%	9,4%	10,9%	-0,22%	7,8%		10,2%
KK an Teir Stêr	11,5%	9,7%	10,4%	-2,40%			4,3%
KK Kreiz Breizh	11,5%	9,5%	10,3%	1,43%	1,4%		5,8%
KK Bro Leon	11,2%	9,7%	10,2%	-0,35%			5,6%
KK Gwengamp	11,4%	9,4%	10,2%	-0,13%	1,9%		4,6%
KK Bro Logunec'h	12,3%	7,4%	9,4%	0,92%	2,7%		6,9%
KK Bro Lesneven hag Aod ar Mojennoù	9,1%	8,6%	8,8%	-0,19%	8,1%	5,1%	8,2%
KTK Lannuon-Treger	10,3%	7,4%	8,5%	-0,05%	3,8%	1,1%	5,5%
KK Aod ar Meurvein	7,4%	7,9%	7,7%	0,83%			3,5%
KK Bro Vaod	9,3%	5,9%	7,2%	0,63%			5,3%
KK Bro Douarnenez	9,6%	5,2%	6,9%	0,99%			3,2%
KTK Bro Kêr-Wened	8,2%	5,8%	6,8%	0,45%	3,0%		4,1%
KK ar Yeun Elez	7,9%	5,9%	6,7%	-0,77%			6,7%
KK Bro an Alre	9,0%	5,1%	6,7%	0,12%	0,6%		3,9%
KK Bro Landivizio	8,4%	5,5%	6,7%	0,18%	1,0%		4,4%
KK Bro Landerne-Daoulaz	8,2%	4,9%	6,3%	0,57%	1,7%	0,5%	4,0%
KK Stêr an Intel	7,9%	4,9%	6,1%	0,18%			4,3%
KK Bro Ploue, ag ar Skorf d'ar Blavezh	7,3%	4,3%	5,5%	0,79%	2,5%		4,5%
KK Bro ar Roue Morvan	5,5%	5,0%	5,2%	0,41%			2,9%
KK "Pempoull Goueloù"	6,7%	4,2%	5,1%	0,19%			2,5%
KK Kanton Kallag	9,1%	2,7%	5,0%	-0,06%			3,4%
KK Su ar Vro Vigoudenn	5,9%	4,3%	4,9%	0,25%			2,5%
KK Bro an Hirwazh	7,5%	2,6%	4,5%	1,01%			3,3%

KK Sant-Yann-Brevele Kumuniezh	5,6%	3,7%	4,5%	-0,29%			3,0%
KK Bro Pondi	4,4%	4,5%	4,5%	-0,15%	0,8%		2,3%
KTK Kemper Kumuniezh	4,6%	3,6%	4,0%	-0,12%	4,0%	0,2%	2,7%
KK Bro Voulvriag	3,4%	4,4%	4%	-0,5%	30,0%		15,2%
KK Bro-C'hlazig	6,5%	1,6%	3,9%	1,16%			2,9%
K-kêr Brest Meurgêr ar Mor	4,5%	3,3%	3,8%	0,13%	2,3%	0,1%	2,3%
KK Bro Gemperle	5,3%	2,7%	3,8%	0,26%			2,2%
KTK Bro an Oriant	4,5%	2,9%	3,6%	-0,25%	1,0%	0,2%	2,1%
KK Bro Maoron e Breselien	5,0%	2,6%	3,4%	-0,65%			2,5%
KK Arvor ar Stêr-Aon	3,9%	3,0%	3,4%	-0,19%			2,4%
KK Gourenez Rewiz	6,0%	1,6%	3,2%	-0,16%			2,1%
KK Bro Redon	3,2%	3,2%	3,2%	-0,10%	0,5%		1,7%
KK Kerne-Uhel	6,0%	1,3%	3,2%	0,99%			2,3%
KK al Loc'h	3,8%	2,6%	3,1%	0,17%			2,3%
KK Bro Vear	5,6%	1,2%	3%	0,6%			1,8%
KTK Bro Vontroulez	4,2%	1,6%	2,7%	0,65%			1,5%
KK Gorre ar Vro Vigoudenn	4,5%	1,0%	2,6%	1,25%			2,1%
KK Gourenez Kraozon	2,8%	2,2%	2,5%	0,26%			1,7%
KK Bro Bloërmael	2,3%	1,4%	1,8%	0,05%			0,8%
KK Konk-Kerne	2,2%	1,4%	1,7%	0,22%			1,0%
KTK Bro Sant-Brieg	1,7%	1,6%	1,7%	0,05%	0,1%		0,8%
KK Bro Gistreberzh	2,2%	1,0%	1,5%	0,41%			0,8%
KTK Meurgêr Roazhon	1,8%	1,2%	1,4%	0,02%	0,4%	0,1%	0,8%
KK Dinan	1,6%	1,1%	1,3%	0,00%			0,7%
KK Bro Gastellin hag ar Porzhe	1,6%	0,3%	0,8%	0,40%			0,4%
K-kêr Naoned	0,8%	0,5%	0,6%	0,01%	0,1%		0,3%
KTK Kab Atlantel	0,7%	0,5%	0,5%	-0,06%			0,3%
KTK Gwitreg-Kumuniezh	0,9%	0,1%	0,4%	0,12%			0,2%
KTK Bro Sant-Maloù	0,3%	0,3%	0,3%	-0,09%			0,2%
KTK Bro Sant-Nazer hag hec'h Aber	0,3%	0,2%	0,2%	0,02%			0,1%
KK Traoù an Il	0,5%	0,0%	0,2%	0,21%			0,2%

■ Kresk ■ Digresk

K.K. : Kumuniezh kumunioù, K-kêr : Kumuniezh-kêr, K.T.K. : Kumuniezh tolpad-kêrioù

Pa renker an DFKEoù diouzh an dregantad a vugale skoliataet en deskadurezh divyezhek er c'hentañ derez ez eo **Kumuniezh kumunioù (KK) Kreiz Bro Dreger** a dap ar feur uhelañ gant **14,8%**. N'eo ket ken **KK Bro Josilin** a erru e penn ar roll-se neuze met derc'hel a ra d'an trede plas memes tra goude KK Bae ar C'hernig. Meur a elfenn a c'hoari war un dro war kresk pe digresk ar feur : emdroadur an niver a skolidi divyezhek hag emdroadur an niver a skolidi dre-vras. En degouezh meneget a-us, eo kresket kalz an niver a skolidi divyezhek e KK Kreiz Bro Dreger tra m'eo digresket un tamm e KK Bro Josilin. En DFKE-se eo kresket an niver a skolidi hollek e keit-se avat.

Gant an DFKEoù e stader en-dro gorrekadur kresk ar feurioù bet meizet dija. **N'eus kumuniezh ebet gant ur c'hresk brasoc'h eget 3 poent pa oa tri anezho e 2007/2008** (e gwirionez, e 2008/2009, ar c'hresk uhelañ a sav da 2,1 poent evit KK Kreiz Bro Dreger). Eus an tu all e konter 21 DFKE gant un digresk e 2008/2009 e-skoaz 15 e 2007/2008.



Ar c'humunioù

Feur ar c'helell divyezhek dre gumun ha dre live - Bloavezh-skol 2008/2009

Depar- tamant	Renk	Kumun	Skol- vamm	Skol gentañ	Ishollad kentañ derezh	Emdroadur e-keñver 2007/2008	Skolaj	Lise	Hollad
Aodoù-an-Arvor	91	Bear	10,80%	2,36%	5,89%	1,40%			2,60%
	13	Benac'h	33,93%	24,32%	28,46%	2,34%			12,54%
	70	Boulvriag	7,55%	10,06%	9,09%	-0,61%			5,43%
	3	Bulad-Pestivien	78,95%	25,81%	46,00%	5,32%			46,00%
	96	Dinan	7,03%	3,87%	4,97%	0,42%			1,02%
	15	Groñvel	34,29%	21,13%	25,47%	-0,24%			25,47%
	38	Gwengamp	18,37%	14,52%	15,89%	0,67%	1,91%		4,09%
	5	Kawan	45,19%	33,33%	38,43%	5,24%			38,43%
	55	Landreger	15,49%	9,73%	11,78%	-4,21%			2,59%
	53	Lannuon	13,81%	10,91%	11,96%	-0,23%	6,22%	1,15%	5,66%
	92	Louaneg	12,31%	0,62%	5,82%	1,55%			5,82%
	36	Louergad	18,18%	14,63%	16,06%	0,95%			16,06%
	48	Mêl-Karaez	22,08%	6,32%	13,37%	3,57%			13,37%
	9	Pabu	38,83%	28,48%	32,46%	0,01%			32,46%
	54	Pempoull	16,60%	9,33%	11,80%	1,00%			3,92%
	97	Perroz-Gireg	12,75%	0,53%	4,79%	1,78%			2,28%
	22	Perwenan	20,33%	19,64%	19,93%	-3,92%			19,93%
	124	Plijidi				0%	100%		35,26%
	12	Plistin	35,43%	25,56%	29,64%	-0,01%			16,05%
	87	Ploubêr	5,81%	6,99%	6,45%	-1,38%			6,45%
	2	Plounevez-Moedeg	100%	40,70%	61,07%	10,29%			61,07%
	45	Rosphez	24,77%	8,68%	14,02%	0,56%			14,02%
	7	Rostrenenn	36,36%	33,33%	34,50%	0,40%	1,84%		8,20%
	103	Sant-Brieg	4,18%	3,84%	3,98%	0,31%	0,19%		1,14%
	111	Tregaeg	1,79%	3,29%	2,70%	-0,43%			2,70%
	35	Tregastell	22,97%	12,88%	16,50%	-4,22%			16,50%
Penn-ar-Bed	75	Banaleg	8,66%	7,44%	7,91%	-1,81%			4,78%
	116	Brest	2,11%	1,82%	1,94%	-0,12%	0,33%	0,09%	0,84%
	76	Brieg	13,44%	3,18%	7,77%	2,32%			4,17%
	67	Daoulaz	21,54%		9,82%	1,70%			3,36%
	74	Douarnenez	11,31%	5,90%	7,97%	1,03%			3,46%
	85	Erge-Vras (an)	7,37%	6,19%	6,62%	-0,65%			6,62%
	52	Faou (ar)	15,22%	10,07%	12,12%	-0,28%			12,12%
	73	Gouenoù	12,33%	5,46%	8,32%	2,41%			8,32%
	84	Gwiler-Leon	8,25%	6,32%	7,02%	0,52%			4,49%
	101	Gwipavaz	5,83%	3,48%	4,39%	-0,07%			2,91%
	19	Gwiseni	24,05%	19,61%	21,55%	-0,48%	100%		49,47%
	56	Gwitalmeze	15,31%	9,33%	11,69%	1,64%			6,83%
	20	Karaez-Plougêr	26,69%	18,55%	21,49%	-2,76%	2,39%	22,47%	16,12%
	115	Kastellin	3,98%	0,73%	1,96%	0,90%			0,53%
	65	Kastell-Nevez-ar-Faou	19,89%	4,36%	10,42%	2,69%			4,75%
	24	Kastell-Paol	22,15%	18,24%	19,67%	-0,10%			6,49%
	98	Kemper	5,39%	4,09%	4,61%	-0,07%	3,87%	0,21%	2,66%
	108	Kemperle	5,99%	1,52%	3,17%	0,30%			1,09%
	14	Kleder	26,39%	25,62%	25,91%	0,18%	20,13%		24,26%

	4	Kommanna	54,55%	37,93%	45,10%	7,68%			27,49%
	113	Konk-Kerne	2,99%	1,63%	2,16%	0,46%			0,96%
	100	Kraozon	5,13%	4,21%	4,58%	0,50%			2,70%
	51	Landerne	15,42%	10,57%	12,46%	0,56%	2,36%	0,54%	5,30%
	82	Landivizio	7,33%	6,97%	7,11%	-1,66%	1,27%		3,23%
	40	Lanneur	27,27%	9,88%	15,26%	2,06%			6,31%
	8	Lanniliz	41,82%	27,45%	33,17%	-1,03%	8,86%		21,05%
	25	Lesneven	21,81%	17,58%	19,08%	-1,33%	2,23%	5,07%	8,87%
	121	Lokournan *	2,13%	0,00%	0,82%	0,82%			0,38%
	41	Loperc'hed	18,97%	11,43%	14,56%	2,78%			14,56%
	80	Milizag	12,50%	4,41%	7,52%	1,10%			7,52%
	88	Montroulez	9,38%	4,48%	6,45%	0,31%			2,06%
	46	Plabenneg	17,76%	11,20%	13,88%	-0,03%	6,70%		10,86%
	83	Pleiber-Krist *	16,56%	0,00%	7,05%	7,05%			7,05%
	68	Plouarzhel	17,09%	5,12%	9,71%	1,69%			9,71%
	34	Ploueskad	17,03%	17,01%	17,02%	-0,73%			9,93%
	26	Plougastell-Daoulaz	24,34%	15,64%	18,98%	1,71%	4,33%		14,51%
	50	Plougerne	14,23%	11,38%	12,52%	0,67%			12,52%
	72	Plougonevelen	18,13%	1,49%	8,44%	2,60%			8,44%
	79	Plouvien	7,80%	7,34%	7,54%	-1,41%			7,54%
	66	Plouvorn	17,83%	4,66%	9,92%	3,17%			9,92%
	102	Plouzane	4,49%	3,83%	4,09%	0,56%			2,33%
	11	Ploveur	36,31%	27,00%	30,71%	1,84%			30,71%
	32	Plozeved	30,84%	7,35%	17,70%	8,11%			8,83%
	95	Pont-'n-Abad	6,88%	4,00%	5,08%	-0,11%			1,31%
	125	Releg-Kerhuon				0%	25,69%		8,64%
	28	Rosko	20,00%	17,61%	18,44%	-0,66%			18,44%
	1	Sant-Riwal	100%	100%	100%	0%			100%
	23	Sizun	29,20%	14,14%	19,74%	3,44%			11,63%
	57	Skaer	13,17%	10,47%	11,62%	0,16%			7,16%
	81	Tregon	8,84%	6,10%	7,19%	0,44%			4,74%
	17	Tremeven	34,55%	14,04%	24,11%	5,79%			24,11%

Il-ha-Gwilen	104	Bruz	5,10%	2,99%	3,76%	0,55%			1,39%
	118	Gwitreg	3,89%	0,48%	1,76%	0,69%			0,55%
	120	Magoer *	2,19%	0,00%	0,84%	0,84%			0,55%
	43	Redon	14,54%	14,17%	14,31%	0,49%	0,59%		2,96%
	109	Roazhon	3,36%	2,51%	2,87%	0,08%	0,84%	0,11%	1,22%
	122	Sant-Maloù	0,53%	0,57%	0,55%	-0,12%			0,22%

Liger-Atlantel	114	Gwenrann	2,82%	1,61%	2,02%	-0,17%			0,78%
	119	Naoned	1,64%	1,24%	1,40%	0,08%	0,11%		0,59%
	126	Sant-Ervlan *				0%	0,36%		0,11%
	123	Sant-Nazer	0,52%	0,34%	0,41%	0,05%			0,17%

Mor-Bihan	107	Alre (an)	4,03%	2,80%	3,27%	-0,17%			1,48%
	64	Baod	12,62%	9,46%	10,70%	0,85%			5,81%
	33	Begnen	22,22%	14,04%	17,36%	-1,30%			17,36%
	27	Brec'h	24,35%	13,33%	18,56%	-1,28%			7,67%
	44	Faoued (ar)	15,04%	13,81%	14,24%	0,77%			6,92%
	29	Gourin	21,09%	16,73%	18,32%	2,03%			6,24%
	77	Gregam	10,28%	6,35%	7,77%	0,60%			4,14%
	6	Gwegon	31,11%	38,21%	35,21%	-0,30%			35,21%
	78	Gwened	8,93%	6,89%	7,71%	0,21%	3,96%		3,40%

89	Gwidel	9,21%	4,74%	6,44%	0,07%			4,27%
94	Henbont	7,23%	4,27%	5,45%	-0,14%	1,45%		2,41%
37	Josilin	20,33%	13,73%	16,05%	-1,05%	4,07%		8,43%
62	Karnag	10,88%	11,11%	11,03%	0,72%			4,10%
117	Kewen	2,80%	1,32%	1,83%	0,43%	1,10%		1,49%
105	Kistreberzh	5,78%	2,26%	3,61%	0,89%			1,17%
47	Klegereg	18,27%	11,46%	13,85%	-0,79%			13,85%
30	Langedig	20,32%	16,76%	18,10%	-0,25%			13,62%
93	Lannarstêr	6,93%	4,88%	5,67%	-0,13%	3,12%	3,07%	4,47%
42	Logunec'h	23,19%	8,85%	14,39%	2,01%	2,39%		7,12%
31	Lokoal-Mendon	22,89%	14,51%	17,81%	0,25%			17,81%
90	Maoron	9,23%	4,85%	6,44%	0,18%			3,71%
10	Mêlrant	55,00%	19,75%	31,40%	7,40%			31,40%
18	Mourieg	18,88%	24,79%	22,12%	-2,07%			22,12%
110	Oriant (an)	3,73%	1,98%	2,71%	-0,77%	0,72%		1,16%
59	Pleskob	13,24%	10,29%	11,45%	-0,04%			11,45%
69	Pleuwigner	10,17%	9,31%	9,66%	0,26%			6,51%
112	Ploermael	3,46%	2,08%	2,62%	0%			0,93%
58	Ploue	15,36%	9,07%	11,56%	1,38%	2,47%		7,11%
106	Ploveren *	9,09%	0%	3,50%	3,50%			3,50%
49	Plunered	20,86%	6,70%	12,89%	2,86%			7,98%
86	Pluvergad	9,74%	3,78%	6,49%	-0,72%			6,49%
21	Pluverin	19,09%	21,71%	20,61%	-0,79%			20,61%
61	Pondi	11,13%	11,47%	11,34%	-0,50%	1,03%		3,06%
71	Pont-Skorf	9,76%	8,06%	8,74%	-1,52%			8,74%
63	Santez-Anna-Wened	12,36%	9,82%	10,82%	-1,33%	3,15%		3,94%
39	Sant-Teve	17,39%	14,17%	15,35%	1,32%			11,43%
99	Sarzhav	8,46%	2,29%	4,59%	-0,15%			2,56%
60	Surzhur	15,35%	8,40%	11,42%	1,64%			11,42%
16	Teiz	32,70%	20,57%	25,37%	0,76%	6,42%		19,64%

■ Kresk ■ Digresk

* Lec'hiadoù nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2008

E-keñver 2007/2008 eo aet war-raok pouez ar c'helenn divyezhek e 61% eus ar c'humunioù ma'z eus ur c'hinnig er c'hentañ derez e 2008/2009.

Kelenn divyezhek dre gumun ha dre live (urzhiat diouzh ar pouez er c'hentañ derez) - Bloavezh-skol 2008/2009

Kumun	Depar-tamant	Skol-vamm	Skol-gentañ	Ishollad kentañ derez	Emdroadur e-keñver 2007/2008	Skolaj	Lise	Hollad
Sant-Riwal	29	100%	100%	100%	0%			100%
Plounevez-Moedeg	22	100%	40,70%	61,07%	10,29%			61,07%
Bulad-Pestivien	22	78,95%	25,81%	46,00%	5,32%			46,00%
Kommanna	29	54,55%	37,93%	45,10%	7,68%			27,49%
Kawan	22	45,19%	33,33%	38,43%	5,24%			38,43%
Gwegon	56	31,11%	38,21%	35,21%	-0,30%			35,21%
Rostrenenn	22	36,36%	33,33%	34,50%	0,40%	1,84%		8,20%
Lanniliz	29	41,82%	27,45%	33,17%	-1,03%	8,86%		21,05%
Pabu	22	38,83%	28,48%	32,46%	0,01%			32,46%
Mêlrant	56	55,00%	19,75%	31,40%	7,40%			31,40%
Ploeur	29	36,31%	27,00%	30,71%	1,84%			30,71%
Plistin	22	35,43%	25,56%	29,64%	-0,01%			16,05%
Benac'h	22	33,93%	24,32%	28,46%	2,34%			12,54%



Kleder	29	26,39%	25,62%	25,91%	0,18%	20,13%		24,26%
Groñvel	22	34,29%	21,13%	25,47%	-0,24%			25,47%
Teiz	56	32,70%	20,57%	25,37%	0,76%	6,42%		19,64%
Tremeven	29	34,55%	14,04%	24,11%	5,79%			24,11%
Mourieg	56	18,88%	24,79%	22,12%	-2,07%			22,12%
Gwiseni	29	24,05%	19,61%	21,55%	-0,48%	100%		49,47%
Karaez-Plougêr	29	26,69%	18,55%	21,49%	-2,76%	2,39%	22,47%	16,12%
Pluverin	56	19,09%	21,71%	20,61%	-0,79%			20,61%
Perwenan	22	20,33%	19,64%	19,93%	-3,92%			19,93%
Sizun	29	29,20%	14,14%	19,74%	3,44%			11,63%
Kastell-Paol	29	22,15%	18,24%	19,67%	-0,10%			6,49%
Lesneven	29	21,81%	17,58%	19,08%	-1,33%	2,23%	5,07%	8,87%
Plougastell-Daoulaz	29	24,34%	15,64%	18,98%	1,71%	4,33%		14,51%
Brec'h	56	24,35%	13,33%	18,56%	-1,28%			7,67%
Rosko	29	20,00%	17,61%	18,44%	-0,66%			18,44%
Gourin	56	21,09%	16,73%	18,32%	2,03%			6,24%
Langedig	56	20,32%	16,76%	18,10%	-0,25%			13,62%
Lokoal-Mendon	56	22,89%	14,51%	17,81%	0,25%			17,81%
Plozeved	29	30,84%	7,35%	17,70%	8,11%			8,83%
Begnen	56	22,22%	14,04%	17,36%	-1,30%			17,36%
Ploueskad	29	17,03%	17,01%	17,02%	-0,73%			9,93%
Tregastell	22	22,97%	12,88%	16,50%	-4,22%			16,50%
Louergad	22	18,18%	14,63%	16,06%	0,95%			16,06%
Josilin	56	20,33%	13,73%	16,05%	-1,05%	4,07%		8,43%
Gwengamp	22	18,37%	14,52%	15,89%	0,67%	1,91%		4,09%
Sant-Teve	56	17,39%	14,17%	15,35%	1,32%			11,43%
Lanneur	29	27,27%	9,88%	15,26%	2,06%			6,31%
Loperc'hed	29	18,97%	11,43%	14,56%	2,78%			14,56%
Logunec'h	56	23,19%	8,85%	14,39%	2,01%	2,39%		7,12%
Redon	35	14,54%	14,17%	14,31%	0,49%	0,59%		2,96%
Faoued (ar)	56	15,04%	13,81%	14,24%	0,77%			6,92%
Rospezh	22	24,77%	8,68%	14,02%	0,56%			14,02%
Plabenneg	29	17,76%	11,20%	13,88%	-0,03%	6,70%		10,86%
Klegereg	56	18,27%	11,46%	13,85%	-0,79%			13,85%
Mêl-Karaez	22	22,08%	6,32%	13,37%	3,57%			13,37%
Plunered	56	20,86%	6,70%	12,89%	2,86%			7,98%
Plougerne	29	14,23%	11,38%	12,52%	0,67%			12,52%
Landerne	29	15,42%	10,57%	12,46%	0,56%	2,36%	0,54%	5,30%
Faou (ar)	29	15,22%	10,07%	12,12%	-0,28%			12,12%
Lannuon	22	13,81%	10,91%	11,96%	-0,23%	6,22%	1,15%	5,66%
Pempoull	22	16,60%	9,33%	11,80%	1,00%			3,92%
Landreger	22	15,49%	9,73%	11,78%	-4,21%			2,59%
Gwitalmeze	29	15,31%	9,33%	11,69%	1,64%			6,83%
Skaer	29	13,17%	10,47%	11,62%	0,16%			7,16%
Ploue	56	15,36%	9,07%	11,56%	1,38%	2,47%		7,11%
Pleskob	56	13,24%	10,29%	11,45%	-0,04%			11,45%
Surzhur	56	15,35%	8,40%	11,42%	1,64%			11,42%
Pondi	56	11,13%	11,47%	11,34%	-0,50%	1,03%		3,06%
Karnag	56	10,88%	11,11%	11,03%	0,72%			4,10%
Santez-Anna-Wened	56	12,36%	9,82%	10,82%	-1,33%	3,15%		3,94%
Baod	56	12,62%	9,46%	10,70%	0,85%			5,81%
Kastell-Nevez-ar-Faou	29	19,89%	4,36%	10,42%	2,69%			4,75%
Plouvorn	29	17,83%	4,66%	9,92%	3,17%			9,92%
Daoulaz	29	21,54%		9,82%	1,70%			3,36%
Plouarzhel	29	17,09%	5,12%	9,71%	1,69%			9,71%
Pleuwigner	56	10,17%	9,31%	9,66%	0,26%			6,51%
Boulvriag	22	7,55%	10,06%	9,09%	-0,61%			5,43%
Pont-Skorf	56	9,76%	8,06%	8,74%	-1,52%			8,74%

Plougonvelen	29	18,13%	1,49%	8,44%	2,60%			8,44%
Gouenou	29	12,33%	5,46%	8,32%	2,41%			8,32%
Douarnenez	29	11,31%	5,90%	7,97%	1,03%			3,46%
Banaleg	29	8,66%	7,44%	7,91%	-1,81%			4,78%
Brieg	29	13,44%	3,18%	7,77%	2,32%			4,17%
Gregam	56	10,28%	6,35%	7,77%	0,60%			4,14%
Gwened	56	8,93%	6,89%	7,71%	0,21%	3,96%		3,40%
Plouvien	29	7,80%	7,34%	7,54%	-1,41%			7,54%
Milizag	29	12,50%	4,41%	7,52%	1,10%			7,52%
Tregon	29	8,84%	6,10%	7,19%	0,44%			4,74%
Landivizio	29	7,33%	6,97%	7,11%	-1,66%	1,27%		3,23%
Pleiber-Krist *	29	16,56%	0%	7,05%	7,05%			7,05%
Gwiler-Leon	29	8,25%	6,32%	7,02%	0,52%			4,49%
Erge-Vras (an)	29	7,37%	6,19%	6,62%	-0,65%			6,62%
Pluvergad	56	9,74%	3,78%	6,49%	-0,72%			6,49%
Ploubêr	22	5,81%	6,99%	6,45%	-1,38%			6,45%
Montroulez	29	9,38%	4,48%	6,45%	0,31%			2,06%
Gwidel	56	9,21%	4,74%	6,44%	0,07%			4,27%
Maoron	56	9,23%	4,85%	6,44%	0,18%			3,71%
Bear	22	10,80%	2,36%	5,89%	1,40%			2,60%
Louaneg	22	12,31%	0,62%	5,82%	1,55%			5,82%
Lannarstêr	56	6,93%	4,88%	5,67%	-0,13%	3,12%	3,07%	4,47%
Henbont	56	7,23%	4,27%	5,45%	-0,14%	1,45%		2,41%
Pont-'n-Abad	29	6,88%	4,00%	5,08%	-0,11%			1,31%
Dinan	22	7,03%	3,87%	4,97%	0,42%			1,02%
Perroz-Gireg	22	12,75%	0,53%	4,79%	1,78%			2,28%
Kemper	29	5,39%	4,09%	4,61%	-0,07%	3,87%	0,21%	2,66%
Sarzhav	56	8,46%	2,29%	4,59%	-0,15%			2,56%
Kraozon	29	5,13%	4,21%	4,58%	0,50%			2,70%
Gwipavaz	29	5,83%	3,48%	4,39%	-0,07%			2,91%
Plouzane	29	4,49%	3,83%	4,09%	0,56%			2,33%
Sant-Brieg	22	4,18%	3,84%	3,98%	0,31%	0,19%		1,14%
Bruz	35	5,10%	2,99%	3,76%	0,55%			1,39%
Kistreberzh	56	5,78%	2,26%	3,61%	0,89%			1,17%
Ploveren *	56	9,09%	0%	3,50%	3,50%			3,50%
Alre (an)	56	4,03%	2,80%	3,27%	-0,17%			1,48%
Kemperle	29	5,99%	1,52%	3,17%	0,30%			1,09%
Roazhon	35	3,36%	2,51%	2,87%	0,08%	0,84%	0,11%	1,22%
Oriant (an)	56	3,73%	1,98%	2,71%	-0,77%	0,72%		1,16%
Tregaeg	22	1,79%	3,29%	2,70%	-0,43%			2,70%
Ploermael	56	3,46%	2,08%	2,62%	0,00%			0,93%
Konk-Kerne	29	2,99%	1,63%	2,16%	0,46%			0,96%
Gwenrann	44	2,82%	1,61%	2,02%	-0,17%			0,78%
Kastellin	29	3,98%	0,73%	1,96%	0,90%			0,53%
Brest	29	2,11%	1,82%	1,94%	-0,12%	0,33%	0,09%	0,84%
Kewen	56	2,80%	1,32%	1,83%	0,43%	1,10%		1,49%
Gwitreg	35	3,89%	0,48%	1,76%	0,69%			0,55%
Naoned	44	1,64%	1,24%	1,40%	0,08%	0,11%		0,59%
Magoer *	35	2,19%	0%	0,84%	0,84%			0,55%
Lokournan *	29	2,13%	0,00%	0,82%	0,82%			0,38%
Sant-Maloù	35	0,53%	0,57%	0,55%	-0,12%			0,22%
Sant-Nazer	44	0,52%	0,34%	0,41%	0,05%			0,17%
Plijidi	22				0%	100%		35,26%
Releg-Kerhuon	29				0%	25,69%		8,64%
Sant-Ervlan *	44				0%	0,36%		0,11%

■ Kresk ■ Digresk

* Lec'hiadoù nevez-digoret er gumun da zistro-skol 2008



Pa urzhier **ar c'humunioù** diouzh pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e renabler **11 gant ur feur en tu all da 30%** (unan ouzhpenn e-keñver 2007/2008), **21 en tu all da 20%** (teir nebeutoc'h eget e 2007/2008) **ha 65 (da lavaret eo tremen un hanter eus an hollad) en tu all da 10%** (teir ouzhpenn e-keñver 2007/2008).


Dek kumun pobletañ Breizh urzhiet diouzh pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez - Bloavezh-skol 2008/2009

	Poblañs lezennel 2006	Niver a lec'hioù divyezhek	Niver a hentadoù	Feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez
Gwened	53 079	5	3	7,71%
Sant-Brieg	46 437	2	2	3,98%
Kemper	64 902	4	3	3,17%
Roazhon	209 613	5	3	2,87%
An Oriant	58 547	3	2	2,71%
Brest	144 548	3	2	1,94%
Naoned	282 853	3	3	1,40%
Sant-Maloù	49 661	1	1	0,55%
Sant-Nazer	68 838	1	1	0,41%
Sant-Ervlan	43 901	0	0	0,00%

Kalz en tu all d'ar c'hêrioù all emañ Gwened gant 7,7% a skolidi divyezhek er c'hentañ derez. **Sant-Brieg zo en eil plas** gant tost da 4%, gant div skol divyezhek hepken er gumun-se. E penn all al listenn emañ Sant-Ervlan, an hini diwezhañ eus dek kêr vrasañ Breizh hep skol divyezhek ebet er c'hentañ derez c'hoazh. Merzout a reer a-hend-all e chom bihan an dregantad a vugale skoliataet en div yezh e kêrioù evel Brest pe an Oriant m'eo strizh ar c'hinnig.

Feur an deskadurezh divyezhek dre garter e kêrioù pennañ Breizh

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e Brest - Bloavezh-skol 2008/2009




Alc'hwez lenn : e karter Sant-Mark ez eus 4,6% a skolidi divyezhek. 23,1% eus bugale skol publik Jacquard e karter Pontanezen-Europa zo skoliataet en div yezh.

E Brest ne c'haller bezañ skoliataet en div yezh nemet e reter ar gumun hag e karter Ar Milinoù. Gant Diwan eo e vez skoliataet an darn vrasañ eus skolidi divyezhek kêr Vrest (77%). Pevar c'harter hep skol divyezhek zo e Brest c'hoazh ha danvez zo enno (etre 1753 ha 2162 bugel skoliataet e pep hini anezho). E Lambezelleg hag e Kreiz-kêr eo e kaver skolioù prevez dreist-holl (n'eus c'hoazh skol brevez ebet o kinnig un deskadurezh divyezhek e kêr Vrest).

Dibar eo kêr Vrest e-keñver kêrioù bras all Breizh gant **ul lec'h divyezhek publik hepken er c'hentañ derez ha lec'h prevez katolik ebet**. Gant ur c'hinnig ken strizh er c'hentañ derez en dez poan ar skolaj divyezhek publik da vodañ skolidi awalc'h. Ne c'hello ar c'hinnig divyezhek en em zispakañ e Brest nemet pa vo digoret lec'hioù all er c'hentañ derez er gumun.


Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e Kemper - Bloavezh-skol 2008/2009



Gant tremen 3% a skolidi divyezhek er c'hentañ derez ez eo diorroet mat a-walc'h an deskadurezh divyezhek e Kemper e-keñver kêrioù bras all Breizh. Splann-tre eo an **digempouez etre an norzh hag ar su** a zeu war wel er gartenn avat. Uhel eo ar feur skoliata en deskadurezh divyezhek e Kerfeunteun (14,5%), e norzh ar gumun, m'eo bodet an tri hentad war un dachenn strizh-tre (ar pezh a gadarna e teu muioc'h a dud pa vez stank ar c'hinnig).

An digempouez a weler etre ar c'harterioù a ziskouez ez eus ezhomm da astenn ar c'hinnig da lec'hioù all e Kemper ; e norzh an Erge-Vihan, er Bradenn, da skouer.


Pouez ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez e Sant-Brieg - Bloavezh-skol 2008/2009



E-touez dek kêr pobletañ Breizh urzhiet diouzh o feur skoliata en div yezh er c'hentañ derez e tap Sant-Brieg an eil plas gant tost da 4%. Talvoudus eo merzout ez eus gant kêr-benn Aodoù-an-Arvor unan eus ar c'hinnigoù strishañ e-touez ar c'hêrioù bras-se koulskoude. **Diskouez a ra an dregantad-se eo brasoc'h berzh ar c'heleñn divyezhek amañ eget e lec'h all, eta.** Evit gwir, n'eus nemet div skol a ginnig un hentad divyezhek e Sant-Brieg : ur skol Diwan hag ur skol publik ; n'eus kinnig ebet gant an deskadurezh prevez katolik evit poent, evel e Brest.

Gant ur c'hinnig a chom strizh c'hoazh e stader un digempouez e dasparzh an deskadurezh divyezhek diouzh ar c'harterioù. Tremet 8% eus bugale karter ar c'hornôg zo skoliataet en div yezh bremañ tra ma n'eus c'hoazh kinnig ebet nag e karter ar reter nag er gevred.

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez en Oriant - Bloavezh-skol 2008/2009




Da 5,1% e sav feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez en daou garter pourvezet e 2008 met izel e chom ar feur war ar gumun en he fezh gant 2,7%, da lavaret eo **dindan kumunioù evel Roazhon pe Sant-Brieg**.

N'eus ket ken eus an deskadurezh divyezhek e kentañ derez katolik an Oriant bremañ m'eo bet serret lec'h Sant-Kristol. En ur blegenn diaes eo bet an hentad publik ivez e lec'h Merville er bloavezhioù diwezhañ. En hec'h-unan e chom ar skol Diwan a zo diazezet amañ abaoe pell, tra ma'z eus bet digoret un eil e Kemper hag e Brest.

Gwall vihan e chom ar c'hinnig divyezhek e kêr an Oriant, dre-vras. He c'heñveriañ gant Gwened da skouer a laka anat dilañs kêr Gouel ar Gelted war an dachenn-se.

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e Gwened - Bloavezh-skol 2008/2009



Diskouez a ra ar gartenn-mañ pegen don eo guriziennet an deskadurezh divyezhek e kêr Wened (5 lec'h divyezhek) e-keñver kêrioù bras all Breizh.


Gant ur feur hollek tost da 8% er c'hentañ derez emañ Gwened dreist da Gemper pe Brest. Tost da 19% eo ar feur skoliata en deskadurezh divyezhek e karter Menemeur ma kaver ul lec'h divyezhek en div skol brevez (32% eus skolidi an deskadurezh prevez e Menemeur zo skoliataet en div yezh).

Bevennet eo an hentad divyezhek prevez d'ar c'harter-se hepken evit poent koulskoude ; danvez a vefe e lec'h all moarvat, nepell eus Kreiz-kêr evel e skol ar Galon Sakr e Kergadoù (skol brevez vrasañ Gwened hag e oa ul lec'h divyezhek enni gwechall) pe e skol Sant-Padern (eil skol brevez vrasañ Gwened) er c'harter Reter, lec'hiet tost ouzh Kreiz-kêr ha war bord an hent da Sine.

Er skolioù publik e vefe danvez evit lec'hioù nevez e Menemeur pe e norzh Kergadoù ivez.

Dre-vras, e norzh hag e reter ar gumun emañ ar c'hinnig divyezhek evit poent : danvez zo evit e astenn e Kreiz-kêr hag er c'hornôg eta.


Pouez ar c'helell divyezhek er c'hentañ derez e Roazhon – Bloavezh-skol 2008/2009



Pell zo eo gwriziennet an deskadurezh divyezhek e Roazhon hag en un hanter eus karterioù ar gumun emañ bremañ gant 6 lec'h. Seul goshoc'h al lec'hioù, seul uheloc'h eo feur ar skolidi a heuilh an deskadurezh divyezhek enno (52% e skol ar Falbont ha 40% e skol ar Frankiz da skouer). **Troc'het e daou eo ar gumun** gant ul linenn norzh-su, dre-uras, hag e lodenn ar reter emañ bodet ar pep brasañ eus ar c'hinnig.

Talvoudus e vefe neuze kaout ur c'hinnig divyezhek e karter Kluneg hag e karter Keryann (eno ne gaver nemet lec'h divyezhek skol Sant-Yann-Bosco hag a zo war un dro skol brevez nemeti ar c'harter ha skol brevez vihanañ Roazhon).


Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e Sant-Maloù - Bloavezh-skol 2008/2009



N'eo ket gwall uhel sifroù an deskadurezh divyezhek e Sant-Maloù c'hoazh. Ar skol divyezhek nemeti zo er gumun zo ur skol bihan a-walc'h.

Talvoudus e vefe prederiañ evit krouiñ un eil lec'h divyezhek publik e Sant-Servan pe e Kreiz-kêr a-benn sevel ur pol er gumun ha diazezañ ar c'hendalc'h en eil derez da-c'houde. E Sant-Maloù e tlefe bezañ ur skol Diwan pe un hentad prevez katolik ivez.


Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e Naoned - Bloavezh-skol 2008/2009



Tri lec'h divyezhek zo e Naoned, liammet gant pep a hentad, ha dasparzhet mat int e tri c'harter disheñvel. Daoust da se, n'eus kinnig divyezhek ebet c'hoazh en darn vrasañ eus karterioù Naoned.

Mont a ra mat en-dro ar skol Diwan, an hini goshañ amañ, hag ezhomm a vije da zigeriñ un eil lec'h e kêr, seul vui ma'z eus ur c'hendalc'h en eil derez bremañ gant digoridigezh skolaj Sant-Ervlan nevez zo. Gounit e vefe an hentadoù publik ha prevez oc'h astenn o c'hinnig, kement-se a-benn sevel gwir hentadoù divyezhek betek ar vachelouriezh. **Bras-kenañ eo an danvez da ziorren en ur gumun a-vent gant Naoned** (13 skol divyezhek publik a gonter e Strasbourg, da skouer).

Pouez ar c'heleñn divyezhek er c'hentañ derez e Sant-Nazer - Bloavezh-skol 2008/2009



Gant Diwan nemetken war he zachenn eo Sant-Nazer ar gêr diwezhañ (gant Sant-Ervlan) eus dek kumun bobletañ Breizh hep kinnig divyezhek publik ebet. E-se, gwall vihan e chom c'hoazh plas an deskadurezh divyezhek e karterioù Sant-Nazer.

Danvez a zo evit digeriñ ul lec'h divyezhek publik kentañ er c'humun-se enni tost da 70 000 annezad.